

AL LANV




Christian Koko

EUSKADI

AL LANV
kelaouenn sokialour breizhek
NIVERENN 46
Mae—Mezheven 88
18 LUR

Bodad ar vugale e-pad Kendalc'h ar Skolaj, Sul 27 a viz Meurzh 1988 (sk. gant kannadig an Eil Derez)



PENNAD-STUR

« Karr ar C'hallaoued a zo Karr an Ankou evit Breizh. »

Goude un hir a stourm eo deut deut a-benn Diwan da zi-frammañ nav c'hontrad eeun digant ar Stad c'hall. Ur bazenn gentañ n'eo ken, met un trec'h eo memestra. Dre hanterouriezh ar rannvro eo aet an traoù da benn, an hent da bleustrin evit an dazont eo. Un eil lañs evit Diwan e vo ar Skolaj Eil Derez a zigoro e Brest e miz Gwengolo. Evit ar wech kentañ o devo kredet Breizhiz mont keid-all war hent an deskadurezh e brezhoneg. Ur c'hammed a-bouez moarvat evit ar vugale hag o c'helennerien, evit o familhoù ivez met ur c'hammed ken bras all e spe-

red ar vrezhonegerien. Pellaat a ra amzer ar vezh, digerin a ra amzer adperc'hennedigezh hon fersonelezh istorel.

N'eus ket kalz a baouez gant latennaj ar bolitikerien c'hall war ar gwagennoù abaoe ur reuziad. Da heul trec'h Mitterand hag e gaolioù a zigoradur eo bet addilennet ar parlamant ha n'eus anv ken nemet eus ar c'hreiz. Ezhomm o deus politikerien ar P. S. eus mouezhioù ar c'hreiz da c'houarn, kement-se zo sklaer. Pezh a zo ken sklaer all eo an diouer a ziforc'hioù anatoc'h-anatah etre ar c'hostezennoù politikel (war-bouez ar P.C. ha re Le Pen, anat deoc'h!). Lubaniñ a ra Rocard da re ar c'hreiz ha nebeutoc'h-nebeutañ e vez santet anv ganto a sokialouriezh. Dre abegoù a wirvoudelezh politikel e seblant an holl bezañ a-du gant ar c'hreiz. Hogen petra eo ar c'hreiz? nemet al LAGENN ma chom sac'het enni an dermerien a-holl-viskoazh... Disteroc'h-disterañ e ya an arguzennadur bolitikel gant ar politikerezh a etredaou-se. Muioch a frankiz d'an

embregerezhioù, d'ar batroned, breskoc'h statud al labourerien, finvusted ha gwevded, kontradou berrbad paet lous, pep tra evit klask kuzhat an dilabour a chom hag a gresk. War a seblant n'eus mui a entan nag a feiz gant ar re a grede a-gent e sokialouriezh ar Stad na gant ar re a grede e kenberc'henniezh ar vicherourien, emveret pe get. Politikerezh an etre-daou eo.

Aman e Breizh eo politike-rezh an etre-daou ivez gant an Emsav politikel. N'eus nemet Emgann a gred mont dirak an dilennerien da embann fraezh e vennozhioù (hag a ra berzh a-walc'h), heulierien Juquin, ar c'halverien da vouezhiañ evit muiañ-niver ar Prezidant a chomo atav da heul... karr ar C'hallaoued. D'ar re a gred en un dazont da bobl Vreizh da gendiazezañ ur strategiezh dizalc'h evit ar mouezhiadegoù lec'hel da zont. An tu nemetañ eo da reiñ hon mouezh da glevet ha da gaout un tamm gal-loud.

AL LANV

-4-

TAOLENN

NIVERENN 46 (Mae-Mezheven 1988)

Evit sevel niverenn 46 *Al Lanv* o deus kenlabouret:

Skridoù:

J.M. Asselin
D. Barastier
Turbar Le Berr
Alan Botrel
Alan Brenn
Per-Vari Kerlo c'h
Perig Kof-Ruz
Gwendal Denez
Youenn Drezen
John Idris
Padrig an Habask
Fañch Jeraniom
Job
Al Lanv
Ar Machikod Dir
Paskal ar Marc'heg
Martial
Erwan ar Moal
Lan Tangi

Tresadennoù:

Kargedoull
Kreston
Paskal ar Marc'heg
Ar Rallig
Tudu

Lizherennaouiñ:

Divy Kervella
Paskal ar Marc'heg

Stumman:
Paskal ar Marc'heg

Sekretourva:
Padrig an Habask

AL LANV
59, hent Kerdronioù Vihan
29000 KEMPER
rener ar gelaouenn; Padrig an Habask
CPPAP 62602
ISSN 0246-5396
kelaouenn disklêriet hervez al lezenn
Gou here 1988
ti-moulañ: du Marin, ar Gelveneg

KOUMANANT (6 niverenn):
100 lur (skoazell: adalek 130 lur)

An holl skridoù, tresadennoù
a zo © **AL LANV** hag an aozer
1988
strizhmiret eo pep gwir

1 Golo
2 Lizhiri al Lennerien *Al Lennerien*
4 Pennad-stur *Al Lanv*
5 Taolenn

KELEIER ETREVROADEL

6 **Afghanistan** Sulh? *Padrig an Habask*
8 **Kembre** An Ijinerezh nukleel
ha Hanternoz Kembre *John Idris*
9 **Euskadi** Brezel *Padrig an Habask*
10 **Finyskeudennoù** *Paskal ar Marc'heg*
10 Embata *D. Barastier,*
J.M. Asselin
11 Unvaniezh *Padrig an Habask*

KELEIER BROADEL

12 **Politikerezh** Ar Mouezhiadegoù
e Bro-Naoned *Paskal ar Marc'heg*
15 Prezidant ar Vretoned *Paskal ar Marc'heg*
15 **Bredoniezh** Jean Ferniot *Paskal ar Marc'heg*
16 **Labour** Skarzh gant ur Mousc'hoarzh
pe Argas hep Tregas *Perig Kof-Ruz*
18 **Gwarioù an Den** Brest 1927,
Sacco ha Vanzetti *Per-Vari Kerlo c'h*
19 Ober *Paskal ar Marc'heg*
20 **Sonerezh** E.V., al Lestr Punk *Gwendal Denez/Al Lanv*
22 **C'hoarioù** Ar Boul-tenn *Ar Machikod Dir*
24 **Sevel er Gevredigezh** Komz Galleg
evel an Tele *Gwendal Denez*

LENNEGEZH

26 **Barzhoneg** Nadir *Lan Tangi*
27 **Danevell** An Ti-bank *Alan Botrel*
28 **Pezh-c'hoari** Ar Chiminaou *Erwan ar Moal*
37 **Dudi** Maze a Lamporechio *Boccaccio/*
Alan Brenn
42 **Istor al Lennegezh** Mari Gloaheg,
Mamm Bleimor *Youenn Drezen*
44 **Skridvarnerezh** *Alan Botrel*

MOCH HA MARC'H

45 **N'eus forzh petra** *Fañch Jeraniom*
& Turbar le Berr
Job, Martial
46 **Gerioù-kroaz & gerioù-diri**
46 **Kemennadennoù** Berr-ha-berr
48 **Kevredigezh** Tro-dro d'an Emsav *Padrig an Habask*
48 **B.T.** Psi-kozh-Noe *Tudu*

Afghanistan

SULH



«Diskoulm ar gudenn afghan en devo ar brasañ efed war an emgannoù e kornioù all ar bed.»

Gorbachev
«Pravda»
14 a viz C'hwevrer 1988

Ha peoc'h a vo bremañ en Afghanistan gant distro an arme ruz? Kounaomp a-raok kregin eo kelc'hiet Afghanistan gant ar broioù-mañ: U.R.S.S., Iran, Pakistan ha Sina evit ul lodennig. Ul lodenn vat eus ar boblañs pachtoun a vez e Pakistan «bennoz» d'an disparti graet gant ar Saozon e 1893. Peseurt abegoù gwirion a zo da gimiad an arme ruz ha penaos e troio an traoù en dazont?

Liammet strizh eo distro an arme ruz ouzh politikerezh ha personelezh Gorbachev. Warlerc'h berzh e bolitikezh a-du gant an dizarman nukleel en deus graet hasañ an distro eus Afghanistan. Kroget d'ar 15 a viz Mae e oa sañset an distro bezañ keitet war nav mizvezh, hervez Gorbachev e vo echuet pep tra a-benn nav miz... An harzerezh dre vras a zo a-du da leuskel an arme ruz da vont d'ar gêr e peoc'h, pennenerien evel Massoud a ren war

draonienn ar Panshir o deus roet o ger. E miz Kerzu 1979 eo e oa bet aloubet Afghanistan gant an arme ruz pa oa deut Babrak Karmal e penn ar gouarnamant komunour Afghan ha tost da zek vloaz war-lerc'h eo an dicheal. Un drouziwezh a dra sur evit ar Soviediz hogen ur frenalz bras da galz a dud en U.R.S.S.. Ez-ofisiel e tistro an arme ruz dre ma n'eus ket mui ezhomm eus he skoazell. Anv a vez ivez eus an darempredoù mat a-vremañ etre Reagan ha Gorbachev, etre ar Stadoù-Unanet hag U.R.S.S.. Evit gwir eo laouen Gorbachev da c'hellout lakaat un termen enorus a-walc'h d'ur brezel a oa koustus-tre d'e vro. Koustus-tre war an dachenn bolitikel ha diplomatek etrevroadel ha koustus-tre ivez da armerzh diabarzh U.R.S.S. emeur o klask skañvaat ha modernaat diwar dizh bremañ. 115 000 soudard eo a zistroio eus Afghanistan e nav miz. N'eo ket un distro diwarant a ra an arme ruz met un distro diasur eo memestra. Dek miliadoù a gargidi etre a zo bet stummet en U.R.S.S. ha fiziñs o deus ar Soviediz e c'hellint derec'hel penn ar gouarnamant hag en arme. Bez ez eus war-dro 100 000 a dud en arme Afghan hag er milisoù pa n'eus «nemet» 65 000 a soudarded reoliek a vicher en harzerezh. Arabat krediñ evelkent eo tra-

walc'h enebin niverou evit kompren dazont ar vro-se. Daou dra a vo a gentañ pouez er mizioù o tont, lealded an arme hag unvaniezh an harzerezh.

An Doktor Najibullah, pennrener gouarnamant Kaboul, a zo krog da brientiñ ar frapad war-lerc'h ar Soviediz. A-du eo da rannañ ar galloud (o terc'hel komunourien ouzh al loc'hoù stur evelkent) gant an eneberezh, gant ar roue Zahir Shah ha gant ar strolladoù armet. Kinnig a ra un distaoliadeg, ur skoazell da zistro an harluidi niverus, un amzer-soudard berraet kalz h.a. ... Nevez 'zo e Kaboul eo bet digoret ez ofisiel skol-veur gentañ ar studioù islamek. 600 studier a zo enni, 200 plac'h en o zouez, stummet e vint da zont da vezañ barnerien pe gelennerien er skolioù relijel. Mennad 2 mammle-zenn Afghanistan disklêriet e miz Kerzu 1987 a embann: «Relijion sakr an Islamiezh eo relijion Afghanistan.» Klask a ra harp ar galloud en arme ha nevez 'zo eo

bet kresket ar goprou. Ma'z eus bec'h e diabarzh ar strollad komunour afghan etre meur a gostezenn eo rannet ar vro gant meur a dra all, Kaboul ha sevenadurezh islamek henvoazel, kempouez ar meuriadoù er gouarnamant, enebiezhioù e diabarzh an harzerezh afghan hag ivez etre an harzerezh diavaez a seizh strollad hag an harzerezh diabarzh... E Kaboul da skouer ez eus nebeut a-walc'h a verc'hed a zoug ar gouel, padal er c'hêrioù all hag er vro a-bezh eo ar muiañ-niver, tost an holl. Rannet eo ar Vuzulmiz etre ar re ziazev, troet o selloù war-zu Teheran, hag ar re henvoazel, a zouje d'ar galloudoù henvoazel. Diwar ar 7 strollad a ra emglev an harzerezh ez eus pevar diazevour ha 3 henvoazel. An holl a zo a-du da deurel ar gouarnamant komunour d'an traoù, e-nebet int avat war dazont ar vro. An henvoazourien a glask un distro da stad an traoù a-raok 1971, un digreizennañ, doujañ d'ar galloudoù henvoazel, distro ar roue Zahir Shah. An diazevourien a fell dezho kenderc'hel ar brezel betek sevel ur republik islamek a

vo, emezo, disheñvel diouzh hini Iran. Fellout a ra dezho kaout an dizober a-grenn diouzh ar galloudoù kozh ha sevel ur republik islamek harpet gant ar broioù islamek all. Betek bremañ eo bet gouest diazevourien ha henvoazourien d'en em glevet war ur gadoniezh, pouezañ war Gaboul ha leuskel an arme ruz da zistreiñ, bremañ avat o devo da ober diouzh trubuilhoù ar pemdez ha diouzh prederioù ar bobl chomet war an dachenn. Gant ar brezel eo bet diazev ar vro ha rivinet an armerzh. Ret eo d'an dud bevañ da gentañ penn, un arm etre daouarn ar gomunourien, kreñv a-walc'h c'hoazh er c'hêrioù, eo skoazell armerzhel U.R.S.S., unan all etre daouarn an diazevourien eo skoazell ar broioù islamek. Un dra zo, avat, ma n'eo ket bet faezhet pobl Afghanistan eo aet faezh gant ar brezel; ur milion daou c'hant mil a dud a zo bet lazhet en emgannoù. An darn vrasañ anezho o deus c'hoant da gaout peoc'h bremañ. SULH.

Padrig an HABASK



mein_bonn

1747— penn-kentañ ren Ahmad Shah Durrani, krouer Afghanistan arvezh.

1893— Troc'h al linenn Durand a zistrann ar provizoù pachtoun lec'hiet etre tremen Khyber hag ar stêr Indus diouzh Afghanistan. Dont a reont da vezañ ul lodenn eus India Breizh-Veur.

1923— Mammle-zenn gentañ.

1933— Zahir Shah a zeu da vezañ roue.

1937— Patchounezh yezh ofisiel.

1955— Penn-kentañ ur steuñv herrek a skoazell armerzhel soviedel.

1964— Mammle-zenn nevez: kambr dilennet, gwir-mouezhiñ d'ar merc'hed.

17 a viz Gouere 1973— Taol Stad a zivarc'h Zahir Shah. Embannidigezh ar republik, Mohammad Daoud rener ar stad.

1975— Sinadur un emglev a nannnagad gant U.R.S.S..

27 a viz Ebrel 1978— Taol-Stat, Ar Strollad Demokratel ha Poblek Afghan a gemer ar galloud, Taraki e penn Kuzul an Dispac'h.

miz Du 1978— Sinadur un emglev a vignoniezh gant U.R.S.S.

miz Gwengolo 1979— Taraki diskaret gant Hafizullah Amin.

miz Kerzu 1979— Lazhet eo Amin. An arme ruz a aloub ar vro. Babrak Karmal a zeu da vezañ ar penn-den.

1981— Kregiñ a ra e Geneva an divizoù dieeun etre Kaboul hag Islamabad.

4 a viz Mae 1986— Ahmadzai Najibullah a gemer lec'h Karmal evel sekretour meur ar strollad.

8 a viz C'hwevrer 1988— Gorbachev a embann distro ar soudarded soviedat war an diviz ma vo kavet un emglev e Geneva.

An ijinerezh nukleel ha hanternoz Kembre



Kent gwallzarvoud Tchernobyl e 1986 e oa an darn vrasañ eus an dud a zo o chom e hanternoz Kembre pe displebant e-keñver an ijinerezh nukleel pe a-du gantañ. Lod a harpe ar *Bodad evit an Dizarmañ Nukleel* (C.N.D.).

Gant gwallzarvoud Tchernobyl avat e voe degaset koumoul a c'hilav skinoberius da hanternoz Kembre. Sur a-walc'h e voe bihan ar gont a skinoberiusted tapet gant annezidi an hanternoz da heul gwallzarvoud Tchernobyl (heñvel a-walc'h ouzh mont da chom d'un tolead evel Kernev Veur ma'z eus kalzik a skinoberiusted naturel er c'herreg). Met en abeg d'ar Casium 137 (radio-izotop hanter-amzer a 30 vloavezh) a zo kouezhet war an douar eus ar c'houlav skinoberius, ez eus bremañ liveoù uhel a skinoberiusted en uhelidir hanternoz Kembre ha hanternoz Bro-Saoz (tolead al lennoù). Abalamour da natur an douar ne steuz ket ar Casium 137 enañ Abalamour da se c'hoazh ez eo uheloc'h al live a skinoberiusted e deved a vez o peuriñ war an uhelidir eget ar pezh a zo aotreet gant ar Marc'had Boutin. Wardro daou viz war-lerc'h gwallzarvoud Tchernobyl e voe berzet dilec'hiañ an deved e hanternoz Kembre, hanternoz Bro-Saoz ha Bro-Skos, an toleadoù bet tizhet gant glaveier gwallzarvoud Tchernobyl.

D'ar mare-se e lavare gouizieien Bodad Labour-Douar ar Gouarnamant e padfe an urzh-berz un nebeud mizioù hepken da c'hortoz ar Casium 137 da vezañ silet en douar gant an douar. Kement-se a zo degouezhet en darn vrasañ eus an atanoù bet tizhet. Hogen war an douaroù aouarc'h eo chomet ar Casium 137 — n'eo ket steuziet kuit. Casium 137 a zo er plant hag an deved (a vez o

peuriñ war an douar treut-se) a zebrar plant-se. Steuziañ a ra al liveoù uhel a skinoberiusted en deved ma cheñcher plas dezho evit o ren da beurvanoù n'eus ket a Casium 137 enno. Pelloc'h ez eus c'hoazh un nebeud kantadoù a gouerien eus hanternoz Kembre a zo paket gant an urzh-berz. E rannoù meneziek Eryri emañ an darn vuiañ anezho e-lec'h ma vev ar gouerien diwar an deved.

En abeg d'ar skinoberiusted ne c'hell ket ar gouerien gwerzhañ o eim (un digoll o deus a-berzh ar gouarnamant — met n'eo ket trawalc'h hervezo — n'o deus ket a-walc'h a arc'hant da baeañ da zerc'hel ein ouzhpenn war o douaroù). Ret e vo dezho ivez strollañ alies o deved da c'hellout muzuliañ o live a skinoberiusted. N'eo ket dajjerus ar skinoberiusted a lavar an N.R.P.B. (National Radiological Protection Board). Ma tebrfe unan bennak 30 kg a gig oan skinoberiek (ennañ liveoù uheloc'h eget pezh a zo aotreet gant ar Marc'had Boutin) e tapfe ur gont a skinoberiusted a zo 0,25 msv (da lavaret eo hanter ar gont aotreet gant ar reolennoù broadel).

Prederiet eo eta annezidi hanternoz Kembre gant an aferioù nukleel. Ur skouer eus ar preder-mañ eo ar respont d'ar brud a oa ar Bodad Tredan (C.E.G.B.) o vont d'ober un taolarnod e reaktor Trawsfynydd. Ar C.E.G.B. a felle dezhañ prouiñ, war



8-

c'houlenn an *Nuclear Installations Inspectorate* (ensellerien ar gouarnamant a ra war-dro surentez ar reaktorien), e oa dizañjer ar reaktorien "Magnox". Ar c'helaouennoù hag an dud dre vras o doa kammentet ar pezh a oa o vont da zegouezhout (sonjal a rac dezho e oa un Tchernobyl all o vont da c'hoarvezout e Kembre) hag e voe kement a reuz a-enep ma voe ret d'ar Bodad Tredan tennañ e daol-arnod.

Preder a zo ivez e-mesk an dud en deizioù-mañ gant raktesoù ar gouarnamant da gaout an dizober eus an dilerc'hioù nukleel (dilerc'hioù klañvdiou, labordioù, ijinerezh taniou Windscale, reaktorien nukleel, h.a.). Emañ an N.I.R.E.X. (aoadur savet gant ar gouarnamant, ar Bodad Tredan, Aotrouniezh an Energiezh Atomek ha British Nuclear Fuels Limited da wellet penaos kaout an dizober eus an dilerc'hioù nukleel) o klask toleadoù mat da zouarañ enno dilerc'hioù nukleel a liveoù skinoberiusted izel. Lavaret en deus e talc'hfe kont eus an elfennoù teknel, eus an eved war ar vro hag ar postadurioù ret da ober hentoù nevez h.a. evit sevel ur mirva hag eus asant ar vro da zegemer an dilerc'hioù.

Daou dolead a Gembre a zo dindan o selloù — Pen Llŷn hag Enez Môn. Pelloc'h o deus holl guzuliou Enez Môn ha Kuzul Gwynedd embannet o enebiezh ouzh raktesoù NIREX. Savet ez eus bet ur c'hlemmskrid en Enez Môn ha kannaded an daou dolead, da lavaret eo Dafydd Wigley ha Iwan Wyn Jones, a zo a-enep krenn an douarañ. Ma talc'h NIREX d'e c'her o terc'hel kont eus menno an dud ne vo ket douaret a zilerc'hioù nukleel e Gwynedd.

JOHN IDRIS

Euskadi

Brezel

Ha savet e vo Europa evel renadurezh Franco: diwar gwad pobl Euskadi?

Un nebeud mein-bonn war hent stourm kalet Euskariz evit o dieubidigezh vroadel.

—Argad E.T.A. gant ur rokedvaner a-enep kazarn Guardia Civil Laudio en Alava. Un darn eus ar savadur distrujet, daou ward sivil gloazet.

—19 a viz Meurzh: Ur gward sivil lazhet gant pevar zenn en e benn laosket gant daou zen yaouank war-droad pa oa harpet e garr-tan ouzh ur stop.

—Hervez ar gazetenn spagnat «El País» e klaskje polis Spagn «goulennta» repudi Euskarat en Aljeria da glask gouzout pelec'h eo dalc'het ar miliardour Revilla bet skrapet gant E.T.A. d'ar 24 a viz C'hwevrer. Nac'het eo bet outo. Kounaet jahinadur Alfonso Etxegarai hag Aldana en Ecuador gant polis Spagn pa oa bet skrapet Guzman.

—Barnet eo Pantxoa da 4 vloavezh toull-bac'h dic'hoursez da vezañ bannet daou goktel molotov ouzh ti an enseller Bonachera e St Jean de Luz. Xan Ansalas ha Xabi Jil o doa dinac'het an tamalloù dalc'hmat a zo bet laosket da vont.

—Txena Beriartzua a zo goure'hennennet outañ chom en

Agen. Da c'hortoz bezañ harluet diouzh c'hoant ar mererezh-Stad?

—Yun-enebñ un tregont den bennak en iliz-veur Baiona da glemm a-enep digenvezadur ar brizonidi tamallet dezho bezañ en Iparretarrak.

—Jean-Noel Etcheverry o vezañ nac'het ober e amzer-soudard en abeg d'e stourm abertzale bet displeget gantañ dre lizher, a zo harzet, kaset dre heg d'ar c'hazarn, sujet d'un armodenn vredevezeg e klañvdi an Arme e Bourdel ha... disluet.

—Francisco Javier Ferreras Chavari, bet harluet d'an 8 a viz Genver 1987, gloazet fall en ur vezañ kaset da Vadrid, a zo barnet gant an Audiencia Nacional da 6 vloavezh karc'har da vezañ iriennet muntrañ ur polisier spagnol.

—Mariano Barbero, bet repuget en tu-mañ ha bet roet da bolis Spagn e miz Here 1987, a zo bet barnet gant Lezvam Ispisial an Audiencia Nacional da 6 vloavezh karc'har da vezañ bet ur guzhiadell en e di-koad en Aguirain.

—Yaou 22 a viz Ebrel: 40 repuget bet roet da bolis Spagn, bet goulenntaet, jahinet, karc'hariet, barnet ha laosket da

vont a zo bet kalonek a-walc'h da zont da Baris da vanifestiñ e burevioù an O.F.P.R.A., an aoadur a nac'h reoliek abaoe bloavezhioù ar goulennoù repu ouzh Euskariz. Daoust d'un tamm bec'h ouzh an harzoù int deut abenn da vont en-dro da greisteiz Euskadi.

—Julen Madariaga, harluad politikel abaoe 1961, kenderzher E.T.A., a zo harzet, tamallet dezhañ bezañ kenlabouret gant E.T.A.

—Koko Abeberry, an advokad brudet, difenner Filipe Biddard Penn Iparretarrak, a zo tamallet da vezañ roet ul lizher d'e gliant.

—Marv Juan Carlos Alberdia Martiarena e karc'har Herrera de la Mancha, diouer a yec'hedoueriezh ha bec'h pemdeziek war ar brizonidi euskarek... 4000 a dud galvet gant ar Gestoras Pro-Amnistia a oa aet da vanifestiñ ur sizhun kentoc'h dirak karc'harioù Herrera, Alcalá, Carabanchel, Barroca, Huesca, Almería, Nanclares, Lugo, Murcia, Cáceres, Albacete, Badajoz, Castellón, Segovia, Córdoba. Kantadoù a brizonidi strewet dre vac'hioù Spagn, ne vac'her ket youl ur bobl avat!

Padrig an Habask



9-

Fiñvskeudennoù

Un darvoud e vo
11vet Gouel ar Sinema
Gouestlet e vo da Euskadi

Euskadi eo a vo danvez ha kouviadez 11vet Gouel Sinema ar Minorelezhioù Broadel, a vo dalc'het etre ar sadorn 27 a viz Eost hag ar sadorn 3 a viz Gwengolo 1988, e Douarnenez.

Brudet eo Euskadi dre ar feulster, un nebeud skouerioù a-vezhañ ho peus lennet war ar bajenn gent: tud bac'het, jahinet, lazhet. Dremmoù arall he deus ar vro vihan-se avat. Setu pezh a la-

var Douarneneziz diwar he fenn: «En Euskadi e vez kelennet ar yezh en un doare poellek, lakat e vez da dalvezout e pep lec'h. Ur statud ofisiel he deus hag implijet e vez en holl darempredoù arnevez ar gevredigezh. «Ken dibar all eo ijinerzh Euskadi. Savet o deus ar vicherourien stalioù-kenlabour ha milieroù a dud a gemer perzh enno dre brenañ lodennoù. An holl a

gav labour en Euskadi, tra ma tizh an dilabour 20% eus ar boblañs e Bro-Spagn.

«Bev-buhezek eo sevenadur Euskadi, tra ar bobl ez eo, hag ivez tra ar yaouankiz.»

Un vro a dalvez ober gwelloc'h anaoudegezh ganti, neketa. Filmoù diouzh an druilh a vo kinniget e-pad ur sizhun e Douarnenez, met ivez kendivizoù lies: amzer dremenet hag amzrevremañ Euskadi, armerzh, sevenadur ha yezh, skinwel ha finvskeudenniñ. Peadra da zastum skiant-prenet ha da strujusat hon ijin.

Kresket e vo lodenn Vreizh. Ar boas hag an hengoun a ouestle d'hor bro devezh ar Gwener. Hevlene e vezo aozet kejadegoù ha kendivizoù all e penn kentañ ar Gouel. Skol an Emsav, diouzh he zu, a zo o prientiñ «un dra



Enbata

Pennad-kaoz gant
ur c'hazetenner eus
Hantemoz Euskadi

E miz Gwengolo 1979 e oa bet dastumet ar pennad-kaoz da heul gant ur c'hazetenner eus Embata, ur gelouenn euskarat eus Baiona. Marvet e oa Franco neuze, met Giscard a oa c'hoazh e penn ar Stad-C'hall. Ne gredan ket koulskoude e vefe diamzeriet ar pennad-se.

Perak emañ disheñvel «spered broadel» Hantemoz Euskadi diouzh hini Kreisteiz ar vro? Ganet e oa an disheñvelder-se da heul an Dispac'h Gall. D'ar mare-se e oa bet krouet departamantoù ha kaset da get e voe «sindikadoù an traoñiennoù. N'o deus Euskariz tennet gounid ebet eus an Dispac'h.

Goude-se ez eo bet stummet

gant ar brezelioù personelezh vroadel «c'hall» Euskariz, a-drugarez d'an argant ha d'an enorioù dastumet en armoù. Er C'hreisteiz eo e kave an dezertourien repu. Du-se, en enep, o deus an dud dalc'het penn ouzh ar galoud-kreiz a-viskoazh. N'he deus Bro-Spagn kemeret perzh e brezel etrevroadel ebet.

Abegoù arm erzh a zo ivez d'an enebadur etre div lodenn ar vro. Pinvidik eo diouzh tu Bro-Spagn ha diouzh tu Bro-C'hall ez eo bet aberzhet pep tra d'an douristelezh. N'eus ket bet dalc'het an disterañ kont eus galoudezhioù ar vro, ret eo bet da Euskariz divroañ, mont er c'harioù bras.

-10-

Ha kreñv eo en Hantemoz ar stourm evit dieubiñ Euskadi?

250 000 den a zo o chom e Hantemoz Euskadi. 10% anezho a vefe a-du gant mennozh ar vroad, da lavaret eo sevel un departamant, anavezout Euskadi ez ofisiel, kelenn ar yezh. Skolioù-mamm a zo, an Ikastolas; paet ha meret e vezont gant tud ar vugale.

Gant petra e vez buhezekeat ar spered vroadel?

E Bro-C'hall emañ repuget Gouarnamant Euskadi da gentañ. An atahinerzh gouzanvet gant ar repudi a laka ivez an dud d'en em soñjal. Skoazellet e vez Etxabe gant kenwerzhourien Donibane-Loitzun, —lennit Saint-Jeande-Luz,— un dra nevez ez eo.

Evel e pep lec'h all e Bro-C'hall emañ sujet ar c'helaouiñ da c'halloud-kreiz Pariz. «Vakañsoù» en deus paket ur c'hazetenner eus Sud-Ouest, e Baio-

bennak» evit dibenn-sizhun kentañ ar Gouel.

Bez e vo, anat eo, ur bern degouezhoù arall tro-dro d'ar Gouel: diskouezadegoù, polotenn Euskarat, kejadenn etre pesketourien Vreizh ha re Euskadi, sonerezh ha trouz, dañserezh hag hejadegoù pilhoù, danvez da evañ, da zebrñ, da flac'hotañ ha, mar bez bolontez Doueed ar Bae, amzer vrav.

Ho pediñ a reomp da zont stank na niverus evel glizigoù e Douarnenez, kêrbenn ar Pennsardinva hag ar Sinema.

Paskal ar MARC'HEG



na, peogwir en doa gouestlet ur rummad pennadoù da gudenn Euskadi.

Bez ez eus ivez gwaskerezh «poellek» ar mererezh-stad, ne zifenn netra met ne aotre netra kennebeut: n'eo ket bet aotreet d'ur stal-genlabour, savet gant micherourien hag argant ar c'hreisteiz, d'en em staliañ en Hantemoz, n'eo bet aotreet ar match mell-droad etre Naoned ha Sant-Sebastian (aozet evit harpañ an Ikastolas), ar brud a red ma vennfe E.T.A. skrapañ Chaban-Delmas, hag all.

Evit pezh a sell ar gwaske-rezh ez eus ur c'hlenlabour strizh etre gouarnamant Bro-C'hall hag hini Bro-Spagn. War div dachenn e c'hoari Madrid e gwirionez: goulenn a ra skoazell Pariz met klask a ra ivez en em glevet gant E.T.A.. Ne sav ket Pariz a-enep ar c'hoari-doubl-se dre ma klask

Unvaniezh

Lañs a zo adarre gant
broadelourien an
Hantemoz,
abaoe ma labouront
a-unan.



—Aberri Eguna, devezh ar Vammvro, kensavet gant an tri strollad broadelour euskarat en tu-mañ: E.A. (Eusko Alkartasuna), E.B. (Euskal Batasuna) hag E.M.A. (Ezkerreko Mugimendu Abertzalea) en Itxasu e-lec'h ma oa bet savet ar c'hentañ Aberri Eguna en hantemoz 25 bloaz a oa. Unvaniezh, ur slogan war giton penn a-raok ar gerzhadeg: GORA EUSKADI ASKATUTA (Bebet Euskadi Dieub).

—Dilennadegoù ar gannaded. En em glevet eo an tri strollad politikel usvenet da gennig danvez-kannaded. O diazezoù boutin da vont dirak an dud? Goulenn groñs e vefe anavezet pobl Euskadi, galv d'an holl, Euskariz pe get, a-enep ar Stad R.P.R., un departamant rannvro Euskadi, ofisieladur an euskareg, an douar benveg labour, arboell lec'hel a-enep an dilabour, rannañ al labour, doujañ d'ar frankizoù sindikadel, ur stummadur gwelloc'h, ur statud evit ar repudi, ar gwir evito da vevañ en Euskadi, un distaoliadeg e stek an diskoulm hollek da gudenn Euskadi.

Disoc'hoù:

Strolladoù	Mouezhoù	%
URC	56 474	48,58
PS	39 917	37,34
ABERTZALE	6 756	5,65
FN	6 531	5,62
PC	4 817	4,14
UPPA	1 770	1,53

Un trec'hig evit an Emsav Euskariz tremenet dreist barrenn ar 5%. Un unvaniezh a vo gouest da deurel frouezh er votadegoù lec'hel da zont. Ha ma kemerfe kentel diwarno an Emsav Breizhek?

Padrig an HABASK

Giscard lakaat Bro-Spagn e-barzh ar Marc'had-Boutin; fellout a rafe dezhañ kempouezañ ennañ galoud ar broioù latin hag hini ar broioù saos ha german.

Evit klozañ e lavarin ez eo deuet an Demokratelezh-en-dro e Bro-Spagn a-drugarez da E.T.A., a vez 60% eus ar boblañs ouzh e skoazellañ. N'eus ket bet a arsav-brezel e Euskadi abaoe 1936, ha ma venn unan bennak kaout ar peoc'h e Euskadi e ranko en em glevet gant E.T.A..

Pa dav kleier an iliz ez eer da welet ar sakrist ha n'eo ket an noter! Na petra.



Komzoù dastumet e miz Gwengolo 1979 evit La Gueule Ouverte gant D. Barastier ha J.M. Asseline; brezhoneg gant Paskal ar Marc'heg.

ADDENDA p.41

Ar mouezhiadegoù e bro Naoned

Paskal ar Marc'heg



Kartenn disoc'hoù an eil tro a ziskouez Breizh rannet-kaer diouzh Bro-C'hall gant «bouzelenn-yac'haüs» departamantoù Kornôg ar Frañs. Eus Eusa betek Klizun o deus ar Vreizhiz votet en hevelep mod, ha grataet da F.M. war-dro 55 % eus o mouezhioù.

AR VOUEZHIADeg E BRO-NAONED

diwallit

En daolenn-mañ e kavod da gentañ an disoc'hoù hervez doare kentañ ar C'hallaoued (implijet eo bet er pennad ivez) ha goude-se, etre kromelloù, an disoc'hoù hervez doare-jedih strevroadel (da gevezoù an daolenn hollek a embannomp en hevelep niverenn).

TRO GENTAN (24-04-88)

Mitterrand	36,79 % (29,35)
Barre	19,89 % (15,85%)
Chirac	19,76 % (15,75%)
Le Pen	10,04 % (8%)
Waechter	4,27 % (3,4%)
Lajoine	3,98 % (3,17%)
Laguiller	2,39 % (1,9%)
Boussel	0,51 % (0,4%)
hep votih	- (18,55%)
gwenn pe d.	- (1,7%)

EÏL TRO (08-05-88)

Mitterrand	54,77 % (44,46%)
Chirac	45,23 % (36,71%)
hep votih	- (16,06%)
gwenn pe d.	- (12,7%)

Anat e oa ar pleg-se adal an dro-gentañ. Disoc'hoù Bro-Naoned a oa bet disheñvel diouzh re Kornôg Bro-C'hall hag heñvel-poch ouzh re peurest ar vro.

E Breizh a-bezh e tizh R.B. un niver dereat a vouezhioù, tra ma tastum J.M.L.P. un niver etre a votoù, nebeutoc'h eget e Bro-C'hall ha muioc'h eget e Kornôg Bro-C'hall.

Disoc'hoù an daou zavez-prezidant-se a spisa ar gwellañ marteze neuz politikel hor bro. Douget awalc'h eo d'ar C'hreiz (R.B.), lañs a zo gant an tu-kleiz ha dilañs gant ar relijion (J.M.L.P.).

Spisaet eo bet dreist-holl talvoudegezh ar savadur artifiel anvet «Pays de Loire». Mirout a ra ouzh Bro-Naoned da vezañ renet gant an tu-kleiz. Derc'hel a ra an departamantoù gall stag outi dindan beli an tu-dehou. Proviñsoù istorel Kornôg Bro-C'hall o deus roet ar muiañ-niver da F.M.: 56% en Normandi, 51% er Maine-Anjou hag er Poitou.

Ur «framm ekonomikel» e vefe ar «Pays de Loire», hervez. Diwir eo. Ur framm politikel ez eo, dezhañ an hevelep pal ha Breizh an 19vet kantved: mirout ouzh ar «mennozhioù nevez» da c'hounit tachenn (1).

Sklaer eo ivez dremm bolitikel Bro-Naoned. Al Liger a rann anezhi etre div loden. Er C'hreisteiz ez a ar maout, da geñver an eil tro, gant J.C., met en Hanternoz ez eo F.M. hag a zo trec'h.

En Hanternoz emañ teier «eienenn» ar sokialouriezh: Kastell-Briant, Naoned-Vras, Sant-Nazer / Ar Brier. Eno e tizh F.M. e uhelañ niver, 80% e Trigeg.

Treuziñ a ra J.C. al Liger koulskoude, er C'hornôg, e Bro-Werrann (eus an aod betek ar Brier) hag er Reter, e Bro-Ansiniz (etre al Liger hag an Erz). Eno e tizh J.C. e uhelañ niver, 70 e Sant-Sulpis-Al-Lanneier. Daoust da se, n'eus nemet rannbarzh-reter kêr Naoned a chomfe, en Hanternoz al Liger, gant J.C.

F.M., diouzh e du, a ziskenn pellik awalc'h e levezon er C'hreisteiz, dindan kêr Naoned.

Talomp ur sell war un nebeud lec'hioù dibar.

Chauty, maer R.P.R. an Naoned, saver Ervenn Vreizh ha touller Plasenn ar C'henwerzh a sav, hep ket a varc'hwen en e loeroù. Votet he deus kêrbenn Vreizh evit F.M. hag e tistroio marteze e kru-builh ar sokialourien a-benn ar vouezhiadeg kuzul-kêr kentañ. Diskennomp etrakek ar

mor. N'o deus ket ar parrezioù nukleel roet muioc'h a vouezhioù d'an danvez-prezidant ekologour eget ar parrezioù all (war-dro 4%). Da geñver an eil tro ez eo aet ar maout gant F.M., koulz e Hanternoz al Liger (71% e Koueron) hag er C'hreisteiz anezhi (63% er Pirc'hirin, 65% e Sant-Yann-Voesel).

P'emaomp ganti, ez eo ret ober anv eus Cheix-en-Retz, ur barrouz vihan tost d'ar Pirc'hirin. Da geñver ar gentañ tro he doa grataet 10% eus he mouezhioù da Waechter ha, war un dro, 18% da J.M.L.P... Dezhi da vout e Kreisteiz al Liger, e roas 52% da F.M. d'an eil tro.

War ribl an Atlantel emaoomp bremañ. N'eo ket gwall-laouen Olivier Guichard, fall-gontant e vefe kentoc'h. Soñj'it'a, e bastell-vro a zo

savet a-du gant F.M., ha reiñ dezhañ 51,5% eus he mouezhioù. N'eo ket peursur ken da vout dilennet en-dro evit an nousepvet gwec'h (bez e vo, ka'e sur).

Gwennik e chom Bro-Werrann, 59% eus mouezhioù ar Baol a ya gant J.C. Met Porzh-Neizhig, da lavaret an hanter eus bae ar Baol, a zo aet gant F.M. (52%)!

Gwashoc'h a zo: n'emañ ket mui O.G. ministr netañ ar c'horn-bro, an den netañ o tarempredih ar galloudoù uhel, peogwir ez eo bet anvet Even, an amezeg, ur mi-c'hiog a zo kannad Sant-Nazer, da vinistr er ouarnamant nevez.

Sanket-don ar bod-spenn e penn-adreñv Olierig, ken e sav muias ennañ, hag hen reiñ da c'houzout, war bannoù e

gelaouenn-lec'hel, *La Presqu'île*.


Mouse'hoarzhin glas a ra titloù ar pennadoù: «A vouloir jouer contre son camp», «La rose voudrait prendre racine dans la Presqu'île».

BRO-NAONED WAR AL LANV

niverenn 44:
«Dizoleit Ho Kêrbenn»
gant E. Mahibil
«Skol Diwan Naoned»
pennad-kaoz gant B. Sautin

niverenn 45:
«Mouezh Breizh e
Bro-Naoned»
pennad-kaoz gant T. Manac'h
eus Radio-Alternantes

pep niverenn 18 lur
da vezañ goulnnet digant:
Al Lanv, 59, hent Kerdrôniou
Vihan, 29000 KEMPER



Dedennusoc'h eo «ger» O.G., Pa lavar F.M. «Restons où nous sommes», e skriv O. G.: «Rester ce que nous sommes». Displegañ a ra neuze abaoe peget e heuilh roudoù ar jeneral, hag e tegas deomp da soñj ar pevar zalvoud (hag a zo re ar marichal kentoc'h) o deus hentet anezhañ a-viskoazh. An daou saourusañ o vezañ: «Briser la lutte des classes par la participation et la solidarité» ha «Maintenir nos valeurs familiales traditionnelles».

Setu roll-labour duce ar «Pays de Loire».

R'hon diwallo Tujan ar C'haper diouzh ar seurt viltañs.

(1) Kemm-digemm e vez ar bed. Kilstourmerien an 19vet kantved a zifenne proviñs an 18vet kantved; kilstourmerien

an 20vet kantved a zifenn ur framm a zo anvet «rannvro», ha n'eo nemet ur «super-departamant», da lavaret eo ur framm eus an 19vet kantved. Disheñvel eo roll an departamant (derc'hel an urzh) diouzh hini ar rannvro (ekonomiezh). Se an hini eo a vez respontet deoc'h. Un touell ez eo.

Kar-nes ez int:

1) dre ma n'eo deus nemet ur roll (urzh pe ekonomiezh).

2) dre ma ne zalc'hont kont ebet eus an istor. Ar rannvro/departamant a zo ur dra plaen hag untiek.

Enebet int ouzh ar «wir» rannvro, evel Katalugna, da skouer. Houmañ a zo hollek he galloud, sanket hec'h amzer-vremañ en istor ha digor war an dazont.

(2) Sklaer eo O.G. da nebeutañ. Pal ar c'hemer-perzh hag ar c'henskoazell a zo «diskar» stourm ar renkadoù; difenn an tiegezh a dalvez difenn an «talvoudoù hengounel».


An 2da lvoud all a zo: «Donner à la France un état démocratique qui tienne la route» ha «Assurer l'indépendance de notre patrie (Bro-C'hall, moarvat) par des moyens modernes.»

DREGANTAD A VOUEZHILOU AET GANT F.M. ER C'HUMUNIOU TRO-DRO D'AN NAONED

SANT ERBLEN	62,8%
SAOTRON	42,7%
ORVEZ	55,4%
CHAPEL-AN-ERZ	59,4%
KERFAOU	50,7%
SANTEZ-LUKIANA	63,8%
SANT-SEBASTIAN	60,7%
GWERZHOU	55,7%
REZHIEG	67,2%

MOUEZHIOU AET GANT F.M. E PEP RANBARZH

RB1-Naoned/Orvez	51,5%
RB2-Naoned-Reter	48,3%
RB3-Naoned/Sant-Erblen	64,3%
RB4-Naoned/Rezhieg	63,3%
RB5-Ansiniz/Chapel-An-Erz	53%
RB6-Kastell-Briant	53,2%
RB7-Ar Bao/Pont-Ar-Chastell	51,9%
RB8-Sant-Nazer/Sevennoz	66,3%
RB9-Bro-Rez	47,4%
RB10-Kluzun	48,8%



Prezidant ar Vretoned



Hon lennerien a gavo amañ disoc'hou klok an dilennadeg evit envel Prezidant ar Republik C'hall. N'omp ket-ni eus ar re a gav dezho ez eo ar votadegoù poent pouezusañ buhez politikel hon bro, met talvoudus ez eo evel meleziour. Reññ a reomp amañ an disoc'hou, n'eo ket hervez an doare gall, met hervez an doare a vez graet e broioù all e-lec'h ma vez dalc'het kont eus an holl dud enskrivet (ar re a chom er gêr hag ar re a vot gwenn a zo tud evel ar re all). Lezel a reomp al lennerien d'ober o soñj gant ar rollad sifroù-mañ met gwelc'h a raint e cheñch an doare da welet-se neuz an disoc'hou ha pouez souezhus a-walc'h ar re a chom er gêr. Da venegiñ ez eus ivez ez eus war-dro 10% eus an dud ha n'int enskrivet war roll ebet.

Tro gentañ	Breizh 1988			Breizh 1981			Eil tro			
	Breizh 1988	Frañs†	Breizh 1981	Breizh 1988	Frañs†	Bzh '81	Bzh '74			
F. Mitterrand	810.980	29,94 %	27,11 %	23,72 %*	1.242.616	45,91 %	43,41 %	41,83 %	36,76 %	
N'o deus ket votet	455.750	16,82 %	17,28 %	17,28 %	381.272	14,06 %	15,87 %	12,92 %	11,85 %	
J. Chirac	446.454	16,58 %	15,94 %	17,48 %**	1.016.102	37,54 %	37,71 %	40,46 %	50,55 %	
R. Barre	431.296	15,92 %	13,03 %	25,28 %						
J.M. Le Pen	220.045	8,12 %	11,78 %							
A. Lajoinie	98.987	3,65 %	5,55 %	8,37 %						
A. Wächter	93.224	3,44 %	2,99 %	3,45 %						
P. Juquin	52.710	1,95 %	1,57 %	1,30 %***						
A. Laguiller	52.073	1,92 %	1,57 %	2,57 %						
Gwenn pe didalv.	39.290	1,45 %	1,69 %	1,02 %	66.902	2,47 %	3,10 %	2,15 %	0,84 %	
P. Bousset	8.821	0,33 %	0,31 %							

† hep Breizh evel-just (na Poluneczia) * Mitterrand + Crépeau e 1981; ** Chirac + Debré + Garaud e 1981; *** Bouchardau e 1981 (evit gwelc'h...)

Jean Ferniot

E miz Meurzh 1979 e oa bet gouestlet *Apostrophes* da vinorelezhioù broadel Bro-C'hall pe d'al luskadoù rannvroel, n'ouzon ket mui.

Tud a bep gouenn a oa bet pedet: Glenmor, Laffont, Sanguinetti ha... Jean Ferniot. Hemañ a oa o paouez embann ul lev-r-preder anvet *En avez-vous vraiment assez d'être Français*. Digenglotadur-mennozhioù a oa etre Ferniot hag ar gouvidi all, trouz ha termaji a savas.

E Breizh e voe skrivet penadoù. War *Le Canard de Nantes*

à Brast e voe roet deomp un tañva eus kredo Jean Ferniot. «Le goût, c'est Paris; l'esprit, c'est Paris; l'intelligence, c'est Paris; la gouaille, c'est Paris; la folie, c'est Paris; l'anonymat, c'est Paris.»

Hevlene, e miz Ebrel e voe pedet adarre da *Apostrophes*: skrivet en doa ar romant. Treiñ a reas ar gaoz avat war mammoù ar skrivagnerien. «Hag ho mamm-c'hiwi, Jean Ferniot? a c'houlenn Pivot.

—Va mamm-me, a respont egile, a oa ur Vreizhadez, ur «Bé-cassine. Deuet e oa e Pariz evel



matezh, ha brazezet e voe gant un aotrou, a zimezas ganti. N'he deus ket bevet pell avat, marvet eo diwar ar c'hriñ-bev p'edon yaouankik. Ar soñj am eus anezhi a zo mesket gant hini an ospitalioù.»

Un istor kentelius, ha trist a-walc'h. Va digarezit.

Paskal ar Marc'heg

Skarzh gant ur Mousc'hoarzh pe Argas hep Tregas

Penaos digargañ hoc'h impliji gant karantez? M&D (Mobilité et Développement: ar re n'ouzont ket galleg n'o deus nemet lenn ar pennad betek penn!) a zo ur gevredigezh cheuc'h war marc'had skiant-prenet an digargan. Kinnig a ran deoc'h mont da welet a-dostoc'h ijin (?) ar c'hioerezh a-vremañ, hini ar «sindikadelouriezh» diouzh ar c'hiz.

Georges Granger bet sekretour meur kevredad CFDT ar vetalouriezh hag ar mengleziou a zo e penn ar gevredigezh-se. Selomp pizh eus a belec'h e teu an argant (ar c'hevala mar plij!): -34% a zeu eus «Mobilité Services», anezhi ur gevredigezh

evit mont-dont frammerien CGC ar vetalouriezh.

-10% a zeu eus ar c'h/CRE-FAC, unvaniezh frammerien ar CFDT.

-5% a zo pourchaset gant an Ao. Dollé bet PDG Gacilor.

-41% a zo rannet etre Granger hag e lakepoded.

-an 10% oc'h ober diouer a zo profet gant an AFPIM («Association pour la Formation Professionnelle des Industries des Métaux») d.l.e. kevredigezh stummadur patroned ar vetalouriezh, an UIMM.

Sklaer pe strafuilhet e-giz dour benniget, kea? Deoc'h da choaz! Displegan 'ra an Ao. Granger da *Libé* ha *Le Monde* pe-

naos ha petailh e ya en-dro e gevredigezh. Sikouret eo hor rener gant ur petrefe den anvet Bernard Poirier bet sekretour broadel Kevredad ar Vetalouriezh CFDT eus 76 da 83; unan eus ar famih santel, petra! Pal ar gevredigezh-se a zo kavout ar mod reizh da zigargañ an dud. «M&D a zo frouezh ur c'hoant kenlabourat etre tud e karg o tont eus an em-sav sindikal hag eus mererezh an embregerezhioù» (*Le Monde*, 3/1/88) Pegen brav eo an Unvaniezh Sakr mod nevez kaset en-dro gant hor patroned-«sindikalourien» diouzh ar c'hiz. Pelloc'h c'hoazh e ya soñj Granger e-barzh *Libé* (6 a viz Genver 88): «Emañ ar soñj-se o treiñ e-

barzh ma fenn abaoe 1985; ur red eo distablled ar c'hopridi evit an embregerezhioù, met bec'h a vez alies war an dud o deus da c'houzañv kement-se.»

Pal M&D?

«Da gentañ digemer ar c'hopridi-se, sikour anezho d'en em zibab en o annezlec'h nevez gant kildroioù ar Bureverezh; tailhoù, konchoù-bank, h.a. ... Ha sikour anezho ivez da gavout bod, 'Benn ar fin hag er c'hentañ penn ober a-gevret ganto an diskont eus o gouiziezh e-keñver ar postoù-labour a rankont derc'hel.»

Met reizh en deus c'hoant hon den mat da vezañ, memestra: «Ne zeuomp ket da hanterour nemet war kefridiou bet divizet en a-raok. Ur stal ma'z eo graet he mennozh ganti diblasiñ 300 goprad, ni, n'emellomp ket eus an dibab-se. War-lerc'h nemetken e reomp-ni war o zro. Gallout a reomp koulskoude reiñ aliou fur en a-raok, da skouer kenkas ne ouffe ket ur patron ar mod da vrudañ ar ger ma fell dezhañ kas an dud dezhi. Ni 'zo gouest da skoaellañ anezhañ.»

M&D, ar mod nevez da skarzh an dud, un astenn d'an emvererezh sur a-walc'h! Levez ha karantez! Bez e c'hellfe bezañ ar ger-stur anezhi: «Deoc'h-c'hwil an digargan ha deomp-ni ar peurrest en hor c'harg!»

Daoust hag-eñ eo bet klevet ar galv-mañ gant ar batroned kristen bodet e Lyon e miz Meurzh da genver 17vet Kendalc'h Kreizenn C'hall ar Batronelezh Kristen e kompagnunezh ar c'hardinal Decourtray hag ar pastor Dupou? Ur brezegenn en deus graet are'heskob Lyon oc'h achuiñ gant ar c'homzou-mañ: «Diwall ar falskehelerezh, ar galloud. Embreger, daoust hag e karez?»

Unan eus ar gendalc'hidi 'neus gouennet da c'houde, «Penaos e c'heller eta digargañ an dud gant karantez?», «Penaos eta e c'heller lazhañ ur c'henstriver gant karantez?». Hervez *La Croix* (22 a viz Meurzh 1988) o rentañ kont eus ar c'hendalc'h, n'eo

deut a-benn na Decourtray na Dupou da respont d'ar goulennoù-se.

Unan hag a rac war-dro ar c'hendalc'h en deus diskuliet e hentenn: «N'eus ken un dra o tinnec'hañ ac'hanon pa' maon tal ouzh tal gant seurt disentez: ar bedenn.»

An teuzer, m'hel lavar deoc'h! Ur farsite!

Diaes eo krediñ memestra e vefe trawalc'h da ziskoulmañ kudennoù luziet an dilabour, Deomp pelloc'h gant rentañ-kont *La Croix*:

«Ma'z eo deut anat d'ar batroned kristen ne c'heller ket gouenn gant an embregerezhioù mirout ur re-niver a dud, ar pouez a zo bet lakaet ganto war gement-mañ: ret eo prientiñ an, termenioù bec'hous, kaout ur strategiezh hollek da verañ ar «peadra denel» ha lakaet poan da verañ an digargañ kenkouz hag an tuta.»

Douetañs ebet e vo tu d'en em glevet gant ar c'hamalad Granger hag e skiant-prenet da skarzh an dud. Dija ez eus patroned e-leizh, kristen pe get, dedennet-tre gant ar c'hinnig-mañ ha prest da sinañ kontraioù gant M&D: Usinor Sacilor, CDF, Renault, Thomson, Pechiney, SNI-AS... Hag ar c'hamalad Granger a gloz ar pennad gant ar c'homzou-mañ: «Mennet-groñs omp da c'houñit argant.»

Evel just, n'emañ ket mui Granger e-barzh ar CFDT met drol eo memestra gwelet aozadurioù sindikal o kemer perzh e-barzh kefridiou a zo pellic-mat diouzh an dachenn sindikal. Al labourerien a blijio dezho hep mar ebet an doare diouzh ar c'hiz da c'houñit moneiz diwar goust an dud digarget. Souezhet ne vo ket lod gant emzalc'h dioutañ e-unan ar CFDT. E-barzh ar *P.B.* niv.290, miz C'hwervr 88, e ouel an UDB d'an Ao. Michel Rolant, niverenn 2 ar CFDT Energiezh, a oa bet lakaet e penn ar Burev Gall evit an Energiezh a oa bet laosket da vont gant an tu

dehou bloaz paseet. Pegen rust e blanedenn da heuliañ penn da benn! Met perak n'eus ket bet kaoz gant ar strollad-se eus an Ao. Chêrèque, niverenn 2 kent ar CFDT (an «eil-Maire»), bet kadarnet dezhañ e garg a brefed gant Chirac hag en doa fiziet enañ zoken ur c'hefridi nevez diwar-benn kemmadur al labour e Bro-Loren.

Ar re o doa gwelet skriteloù an UDB diwar-benn Breizh hag al Loren un nebeut bloavezhioù 'zo a glasko gouzout dres a-walc'h hag en n'eus ket keuz hor strollad pennaok d'ur Chêrèque «made in Brittany.»

Anvet eo bet hor prefed-«sindikalour» da isministr gant M. Rocard (kendigouezh?). Tro 'no da servijout kement mestr, n'eus forzh eus peseurt tu!!! Goulennataet eo bet hor prefed-«sindikalour» kent gant B. Richard war Ouest-Torch, d'an 12 a viz Ebrel 1988. Laoskomp ar gomz gantañ:

«Lavaret 'm eus da baotred an dir: Ac'hanta paotred! Ret eo krapañ e-barzh ar bagon.» Heklev ar c'homzou-mañ a vo kavet iskis a-walc'h gant ar re o deus bevet e-pad ar brezel (tud «archoe») ke-nañ, hep mar ebet!). Hiziv an deiz e vez lavaret kentoc'h «Tap da sac'h!» neketa? O! blaz pegus an STO.



«Kant eurvezh pariantedoù a zo kant kompagnunezh CRS-ed bet arboellet ganeomp.»
Ma vijen-me bet e plas M. Rocard (ra vin gwarezet eus al lorgnez-se) 'm bije lakaet hor c'hamalad Chêrêque e Minister an Diabarzh evit e efedusted!

En em zivouchañ a ra hor prefed-sindikalour a-benn ar fin: «Politikel e-keñver mad an holl eo ma c'harg. Pa 'm boaasantet da vont da brefed e ouien e rankien plegañ d'ar gouarnamant, n'eus forzh pehini e vefe.»

Derc'hel soñj eus e yaouankiz a ra niverenn 1 kent ar Skouted ha niverenn 2 kent ar CFDT: dre forzh daoulinañ dirak ar groaz e sav c'hoant dezhañ lakaat ar re all da samañ anezhi ha da zaoublegañ evit brasañ mad an holl. Un dra a vank c'hoazh d'an embregerien youlek diouzh ar c'hiz: pleustrin bremañ un tamig muioc'h war dachenn an digemer, sevel da skouer kampou-digemer ma vije skrivet war an nordal anezho en ur yezh europat: «ARBEIT MACHT FREI!» (dieubin an den a ra al labour). N'eus ket par d'ar mennozhioù kozh da sevel traoù nevez! Daoust hag en e chom «Bevañ ha labourat er vro» ur ger-stur e-barzh ar CFDT? Ar Feiz, 'vez lavaret, a zo gouest da ziblasañ ar menezioù. D'am soñj eo gouest da cheñch ar speredoù.


Perig KOF-RUZ

**DALCHOMP
SONJ!**

Kelaouenn istorel vreizhat
- trimiziek -

15,00 lur an niverenn
Koumanant : 70,00 lur
36 straed Emile-Zola
56100 an ORIENT

Brest 1927 Sacco ha Vanzetti



E 1977 e voe savet ur film diwar-benn Sacco ha Vanzetti da zegas da soñj an afer mantrus-se c'hoarvezet a-raok ar brezel-bed diwezhañ.

Ur ganaouenn vrudet ivez bet kanet gant Joan Baez a zo bet klevet e pep lec'h.

Tamallet 'voe da Sacco ha Vanzetti un torfed ha koulskoude e oant digablus. Anzavet eo bet an dra-se abaoe. Bourc'hizien ar Stadoù Unanet a felle dezho flastrañ daou stourmer a oa bras o levezon war emsav ar vicherourien.

Er bed a-bezh, e nouspet bro, e voe aozet manifestadegoù ramzel a-benn klask lakaat ar gouarnamant amerikan da gilañ ha da virout outañ da zrouklazhañ an daou stourmer micherour.

Dre intrudu ar peoc'hgarour bras Louis Lecoin e voe krouet kengorior-skoazell e Bro-C'hall. Setu aze testeni René Lochu bet e-barzh «Kengor Sacco-Vanzetti» Brest er mare-se:

«War wazh e ya an traoù evit an daou stourmer...»

«Hep mui gortoz, o c'hervel ar c'hevredigezhioù micherour, ar strolladoù eus an tu kleiz hag an

dud a youl vat, e tivizas bodad li-berterien Vrest sevel ur «C'hengor Sacco-Vanzetti». Stourm di-ehan a rejomp, ganeomp bepred ar spi en hor c'hreiz da savetein anezho. Ne felle ket deomp krediñ e vije bet kaset da benn ken gwazh torfed. Mizvezhioù-pad e teuas an eil war-lerc'h eben bodadegoù ha manifestadegoù. E kement rannger eus a Vrest e voe staliet taolioù er straedoù a-benn dastum sinadurioù da gas da c'houde da Gannadouriezh ar Stadoù Unanet...

D'an 23 a viz Eost 1927 e voe lakaet d'ar marv, drouklazhet an daou verzher. Seizh vloaz he doa padet o beilhadenn.

«An devezh war-lerc'h o lakidigezh d'ar marv e voe dalc'het ur vodadeg diwezhañ e sal «Ar Vrestadeg» war leurgêr Sadi-Carnot. E fin an emvod e voe divizet mont en an mbroug da Di ar Bobl; dilezel a rejomp «Ar Vrestadeg», Kengor Sacco-Vanzetti e penn an mbroug, hag ez ejomp d'an traoñ gant ar ru Treuz warzu ar tu Siam. Er ru Siam avat, tal kichen ar ru D'Aiguillon, e oa stanket an hent gant un duilh Gwarded Vobil. Grons 'voe kement deomp divodañ gant ar c'homiser-polis. Goude ma voe

bet kuzuliet dileuridi an aozadurioù gant hor c'hamalad René Martin, e voe divizet an difloskadur.

«Marv eo hor c'hamaraded, —a lavaras Jacques Demoy, sekretour sindikad paotred ar metaloù,— n'omp ket gouest ken d'ober muioc'h evito. Petra 'dalv mont pelloc'h en argoll?»

«Etre daou renkad a Warded Vobil, hag a ziskoueze deomp bezañ kintus, e teujomp a-benn da dremen a strolladoù bihan. Evit ar re o deus bevet en amzer-se hag heuliet kalvar hirbadus an daou verzher-mañ, n'eo ket marv-mik Sacco ha Vanzetti. Bev-buhezek e-barzh o eñvor int dalc'hmata.

«Un hantergantved war-lerc'h e voe azbrudet o anv, e 1977...

«... Degemeret eo da wir hiziv an deiz ne oa ket torfedourien eus Sacco ha Vanzetti; ar gaou a oa warno, ma c'heller lavaret e-giz-se, a oa e oant embroidi hag ouzhpenn anarkourien.

«Er c'henistor-se e oant deut da vezañ tamallidi eus an dibab. An daou Italiad-se a oa anezho un arouez a stourm dispa-c'hel, ur skouer a voe graet anezho, setu tout.

«Pet Sacco all, pet Vanzetti all, lidlazhet war aoter al «Leue Aour», a baeo c'hoazh gant o buhez, o youl da vezañ en ur bed gwelloc'h: a justis, a Frankiz, ma

vo argaset dioutañ ar brezel da viken. Ma ne vo ket mui ennañ mabden ur bleiz evit mabden!»
(*Libertaires, mes compagnons de Brest e d'ailleurs*, René Lochu, ti-embann La Digitale, Kemperle 1983)

Peget e veze skritelloù e kêr Vrest a-bezh. Setu unan anezho o c'hervel ar vicherourien ha difennourien an daou stourmer d'ur vodadeg vras aozet gant ar sindikajoù:

**KENGOR DIFENN SOKIAL
BREST
SKOAZELL RUZ
ETREVROADEL
AOZADURIOU SINDIKAL
LIESTU**

**C'HWEC'H VLOAZ
DIRAK AR MARV**

Setu buhez (?) kriz Nicola Sacco ha Bartolomeo Vanzetti. Heugñ a ra kalon unan hag en em zispac'hat a ra ar spered pa soñjer e c'hell ur pezh kriz a zen,—gour berner THAYER,— hag eñ gouest koulskoude da c'houzañ en e gig e-unan, asantiñ d'ar roll euzhus da rediañ,—ken kriz hag ul loen fery,— daou zen da sellet e-pad c'hwec'h vloaz bep mintin ouzh skeudenn douellus lar gador dredan.

Gouzañv ar gwaskoù da vat a raio an daou verzher-se e penn kentañ miz Gouere.

En deizioù-mañ er bed a-bezh e sav klemmoù fromus a-enep an torfed.

Fellout a rafe deomp e tridfe Brest a-unvan gant garmadeg ar bed a-bezh ha ma vije klevet e he mouezh.

D'AR SADORN
14 A VIZ MAE
20e RESIS
SAL VRAS PELLOUTIER
TI AR BOBL

BODADEG VRAS

Prezegerien Josette CORNEC (UD «Unitera»), Charles BERTHELOT (UD «Kengevredeta»), J. Ar GALL (Kengor Difenn Sokial), R. MARTIN (Sindikajoù Dizalc'h).

* * *

Daou-ugent vloaz war-lerc'h merzherinti ar stourmerien krouget e Châteauneuf e oa mastaret c'hoazh an Demokratelezh amerikan. Hag ur wech ouzhpenn diwar goust an anarkourien!

MALLOZH RUZ D'AR VELI

Per-Vari KERLOC'H

ober

D'ar Sul 5 a viz Ebril ez eus bet lidet ur Gouel e koun Marc'harid Gourlaouen.

Un domad tud a oa en em vodet diouzh ar mintin e bered bras Douar-nenez. Liv ar glav gant an amzer evel d'an deiz-hont ma voe beziet eno Jakez Riou.

Lakaet e voe ur blakenn war ar bez, skrivet e oa warni:

*Didrouz he deus hadet er goañv
Eostad puilh a savo d'an hanv
Distaget e voe un nebeud gerioù, a fealded hag a vignoniezh.*

Un 200 kouviad, kozh ha yaouank, a gemeras perzh goude-se er pred aozet gant Ober, e Toull-ar-Vilvig, Treboul. Debret o deus, heul-ouzh-heul, panerad ar pesketaer, kalipez

kriener, morzhed-hoc'h gant trevad al liozhioù, ha lipousezreñ al ledenez.

Da vare ar c'hafe eus bet distaget div brezegenn, an eil gant Herle Denez, a verkas al liammou etre Marc'harid Gourlaouen hag he c'hêr c'hendik (div stourmerez), eben gant Riwanon Kervella, nerez a-vremañ Ober, a gomzas eus al labour kaset da benn gant ar skol dre lizher, abaoe ouzhpenn un hantergantved.

Gant kanaouennoù ez echuas ar pred.

D'an hevelep deiz e oa tro gentañ ar vouezhiadeg-parlaman e Bro-C'hall. Ha fae a rae kouvidi ha kouviadeged Toull-ar-Vilvig war ar politikezezh, war ar gwivoud?

Ur gwivoud all a enoret kentoc'h: hini an dud-se a stourm hep skoazell ar mediaou, hep trouz aner, hep gortoz taol-strobinell ur gouar-

namant nevez... evit ar vezh.

Stourm Marc'harid Gourlaouen eo bet. Stourm he c'henroidi hag he c'henroadezed ivez, a zalc'has penn ouzh an dienez,—a oa c'hwerv pa oa yaouank Marc'harid Gourlaouen,—tud a denne o nerzh diouto o-tan, diouzh o c'hoant bevañ, ha n'eo ket eus urzhidienn ur minister bennak.

Hor stourm-ni eo, hag e talc'himp da gargañ ger-stur Breizhiz an 20vet kantvet: «Ober!». Zoken mard eo evitomp ar porzh diwezhañ, ar poull ma taolimp hor telegenn e-giz un eor, ur bez yen, en ur vered vras didud.

Paskal ar MARC'HEG

Titouroù war «afer» Marc'harid Gourlaouen, gwelet p.47, kemennadenn «Kristenion Vreizh».

Al Lestr Punk

E.V.

Bannlev Naoned.

A-dreuz ar gwerennoù e spurmanter an oabl louet-gwenn ha liorzhoù glas ha ruz, en em astenn betek an dremmwel, — tier all. En tu all d'ar straed digenvez, war ar c'hae, ur plac'h, fuillet he blev du. Difin emañ hentoù houarn an tramgarr.

Keder-brec'h, ur C'hebekad a lenn Bran-Ruz; plantennoù a gresk e goulou an deiz; estell, levrioù, pladennoù, hag ardivinkoù; skingomzer, chadenn, gitarioù plat hag, e sklerijenn un eil prenest, evel un oaled, ar piano du.

Kaner E.V. eo Gweltaz Adeux. An Naonedad-se a zegas sonj eus an Atlanel: ul labous-mor a zen, gwech o plavañ, gwech all o tinijal trumm davet ar piano du, —torret ar gaoz evel ur vi.

Selaouomp enverenoù an enroller du:

Emaoc'h o tistreiñ eus Bro-Gembre?

Gwir eo. Pedet e oamp bet e Caernafon gant Gouel ar Sine-ma hag ar Skinwel Etrekeltiek. Aozet mat e oa. Sonet hon eus en ur sal anvet «The Majestic», dirak un tri c'hant a dud. Kalz merc'hed a oa o tansal dirak al leurenn ha startijenn a oa gant an holl. Un abadenn dispar, war o deus lavaret an dud.

Gwelloc'h e oa an arvestidi (hag an arvestadzed) eget e Breizh?

N'heller ket lavaret se. Dedenet e vez bepred an dud gant ur strollad estren. E Bro-Fin hon eus sonet, heñvel e oa. Ar memes tra eo evit ur strollad estren a zeu e Breizh, *Maffia* da skouer.

Anavezout mat a rit ar strolladoù rock kembraek?

Un tammig. Choariet hon eus gant *Maffia* e Konkerne, evit Diwan. Mignoned omp abaoe. Anavezout a reomp *Y Brodyr* a oa o seniñ en hor raok e

Caernafon. Darempredoù hon eus gant *Anhrevn*, ur strollad eus Hanternoz Kembre. Sone-rezh punk ez eo... N'eo ket punk-tre, met start eo, sone-rezh kreñv. Sonerien underground int, hag abalamour da se ez int dedennus. E Bro-Ala-magn emaint er mare-mañ.

Distreiñ a rit da Gembre? Kavet hon eus un den evit aozañ un droiad e miz Gwengolo pe e miz Here. N'eo ket sur c'hoazh.


Piv eo E.V.?

E.V. a zo bet savet e 1981. Pevar omp, an holl war-dro 30 vloaz, yaouankoc'h zoken. Bez ez eus daou Vreton ha daou Finad.

E Bro-Fin emañ Naoned neuze?

E Breizh emañ. Tad hon daou Finad a oa ur Breizhad. Edont o chom e Naoned, met fineg eo a gomzont.

E.V. war al leurenn,
e-pad Gouel Broadel ar
Brezhoneg 1988
(skeudenn L.Blouze/
Emgann)





Dalc'homp gant istor E.V.? Kroget hon eus evel ar strolladoù all. Savet hon eus un nebeud kanaouennoù, kemeret hon eus perzh en hon abadennt gantañ.

E pelec'h e oa?
E *La Montagne*, e-kichen Naoned, en ur greizenn sevenadurel. Ur pevar-ugent a dud a oa. Bez e oa dija ar startijenn ez eo brudet E.V. eviti, an diwan

eus hor c'hanaouennoù a-vremañ (ha merc'hed o talsal dirak al leurenn?). Labourer kalz hon eus goude-se. Divizet hon eus embann ur bladenn vihan, ha c'hwec'h miz goude unan all. Kroget hon eus ivez gant an abadennoù. Ur mil den, e 1984, er Sal Paul Fort, e Naoned. Div droiad e Bro-Fin, e 1985 hag e 1986. Ar wech kentañ hon doa kemeret perzh en ur gouel bras e Turku hag an eil gwech hon eus c'hoariet e Helsinki dirak 10 000 den.

Gwelet oc'h bet war an tele? Un daouzek «tele» hon eus bet graet. Darempredoù hon eus gant *Chadenn ar Vro*. An abadennt wellañ eo an hini bet graet da geñver embannidigezh *Skorn*, hor pladenn vras. Un abadennt hon eus graet e Bro-Fin ivez.

Peseurt darempredoù ho peus gant an Emsav? Darempredoù hon eus gant ur bochad tud e Breizh. C'hoariet hon eus evit Diwan, evit Gouel Broadel ar Brezhoneg. Seurt

gouelioù a zo pouezus, mat eo evit ar strollad seniñ dirak 5000 den.

Diseñvel eo E.V. diouzh ar strolladoù «breizhek» all? Un dra a-bouez eo evidomp sonerien evel Stivell pe *Tri Yann*. Er bloavezhioù 70, pa oamp krennarded, e oa ur bern strolladoù e Breizh, hag e Naoned. D'ar mare-se hon eus komprenet petra oa Breizh. N'eo ket bet levezonet *sonerezh* E.V. ganto, met ar sevenadur a zo un dra pouezus. Mat eo, a-hend-all, kaout un anaoudegezh eus pep tra, eus an *Top 50* betek ar sonerezh hengounel, evit sevel ur sonerezh personel.

Perak n'ho peus ket dibabet ar sonerezh hengounel? Re ziaes e oa evidomp. Ret eo bezañ barrek evit plediñ gantañ. Hor sevenadur ouzhpenn a zo ar sevenadur rock, un dra eus hor rummad eo ar sonerezh punk. En abeg d'ar rummad punk eo emaoamp war al

leurenn. A-raok e oa sonerezh, sonerien a-vicher. N'omp ket teknikourien, seniñ a reomp gant hor bouzellou, hor skipoù. Klask a reomp sevel ur sonerezh poblus, ur pob' sonerezh.

Ober a rit n'eus forzh petra neuze?

Ne reomp ket. Fellout a ra deomp kas da benn ul labour naet ha kompenn. Echu eo ar wagennad folk-sonerezh e Breizh. Ne oa ket an dud-se, me'gred, tud a vicher, alies. Spontus eo pladennoù zo... Pouezus-kenañ eo ober ul labour rik ha resis.

Menneget ho peus *The Pogges* en ho pennad-kaoz war *Vre-mañ*?

The Pogges a zo un dra vat evit Keltia. Souezhus eo: plijout a reont da dud a lavar traoù sot diwar-benn ar sonerezh hengounel. Ne blij ket ar sonerezh hengounel d'ar sonerien rock, met *The Pogges* a blij dezho. Padal ez eus ur bern strolladoù oc'h ober an hevelep sonerezh en ur mod gwellañ, *Chieftains*, *Planxty*... Mat-mat eo pladenn diwezhañ *The Pogges*.

Lavaret ho peus e oa «droch» ho kanaouennoù. Ne glaskit ket kentelien an arvestidi hag ar merc'hed o talsal dirak al leurenn?

N'int ket droch... Bez ez eus un diforc'h etre ur strollad a-vremañ e-giz E.V. hag ar strolladoù a wechall. Ne esaomp ket lavaret d'an dud ar pezh o deus da ober, ne ganoamp ket kanaouennoù-stourm. N'omp ket barrek-awalc'h d'o sevel ivez. Tud zo a ra an dra-se en un doare dedennus. N'omp ket-ni evit hen ober.

Kanañ e brezhoneg, forzh penaos, a zo stourm. Gouet e vefemp da ganañ e saozneg pe e galleg. Plijout a ra deomp kanañ e brezhoneg ha sevel testennoù war demoù a blij deomp, mojennoù, istorioù mor...

Pezh a dalveze «droch» eo e vezomp foll a-walc'h war al leurenn. Dremmoù spontus a blij deomp ober, evel Cüchulainn.


Hag an dazont? Ur bern dileoù hon eus bet evit paeañ *Skorn*. Sklaeroc'h emañ

an traoù bremañ. Mat e veze sevel kanaouennoù nevez, e brezhoneg pe e fineg. Karout a rafemp kavout un ti-pladennoù, met diaes eo. Skorn a zo bet skignet gant ar C'hoop-Breizh, met n'eus ket bet bruderezh a-walc'h. E Bro-Gembre eo bet gwerzhet avat, hag e Bro-Fin. Ur paotr nevez a zo ouzhr ar siñte a-hend-all. Emaon o soñj labourer kalz evit krouiñ traoù all, dibab ur mod nevez, kavout roudoù nevez.

Pennad-kaoz dastumet e Naoned e miz Ebrel 1988



UR C'HOARI AES: Ar Boul-Tenn



Ur c'hoari-hengounel a Vro-Gerne eo ar c'hoari «boul-tenn». Ur «pil-koad» ha bouloù a ranker kaout evit c'hoari. Setu amañ evit ar wech kentañ war Al Lanv doareoù ha lezennoù penañ ar c'hoari. Ma fell deoc'h gouzout hiroc'h, bezit e Kergoad, —Kemenven,— d'an 11 a viz Gwengolo 1988.

AR PIL-KOAD

Ar pil a zo anezhañ ur pezh tamm koad a sanker don a-walc'h en douar, ha war an tamm anezhañ o chom a-rez d'an douar e lakaer teier boul. Mentoù ar pil a zo dre vras

0,80m X 0,20m, 5m bennak a chom a-us d'an douar. Seul donoc'h 'sanker tamm traoñ ar pil en douar, seul digrenoc'h e vo. Da zegemer warnañ an teier boul eo ret ober teier c'hleuzadenn da zerc'hel diruilh ar bouloù. An hini gantañ da vezañ

staliat war ar pil eo ar vout greiz anvet ar *vigoudenn*. Lakaet e vo e-kreiz ar pil. A-hep tu dezhi e vo lakaet an div vout all, anvet an *daou vachikod*. Etre ur *vachikod* hag ar *vigoudenn* e vo

laosket plas a-walc'h da dremen un trede boul hep na ruzfe re houmañ nag a-gleiz nag a zehoù. Peurvuiañ e vez savet ur pil gant koad kalet-tre: ivin, derv, kistin, beuz...

AR BOULOU

Nav boul a ranker kaout petra bennak ma c'heller c'hoari gant c'hwec'h. Teier a lakaer war ar pil hag ar re all a vo da vannañ etrezek ar pil d'o c'has kuit.

Ment ar bouloù: trogeloù: 30sm; treuzlinenn: 9/10sm; pouez: 950/1050gr.

Gwechall e veze ar bouloù e koad. Hiriv e kaver daou seurt bouloù: —Reoù e dir, ar muiañ implijet,—Reoù e plastik kendeuzet,—kenlakaet hag a zo gwelloc'h-marc'had.



DIVERRAN EUS AR REOLENN

—8,50m. etre kreiz ar p hag al lec'h-bannañ.

—Gant ur vout bannet e ret kas kuit bouloù ar pil hep n'kouezhfe houmañ war an doua a-raok kenstekin outo.

—Taliouñ-c'hoari. En ur mod hiniennel pe daou-ha-daou e c'heller c'hoari. Neb a zeu a-benn da ober ar buanañ, lakaomp 21 poent, hennezh a c'hounez.

—Talvoudegezh ar bouloù. ar *vigoudenn*, 2 boent; ur *vachikod*, 1 poent.

—Ober *kloukig*: Pa c'hoarvez gant ur vout bannet kas kuit ur vout eus ar pil ha war un dro kemer he flas, lieskementet e vez dre zaou talvoudegezh ar poent.



—Ur sav: Pa c'hoarvez gant ur c'hoariet tennañ kuit ez-reizh holl vouloù ar pil, neuze en deus graet ur sav. Ha ma chom c'hoazh bouloù gantañ da c'hoari, ec'h adlakaer neuze teier boul war ar pil.

—Gerioù o tennañ d'ar boul-tenn: *bouloù*, *bigoudenn*, «*deve*t ar *vigoudenn*», *vachikod*, *pil*, «*Koad*», «*Road*», —poent ebet,— «*Gour!*», ober *kloukig* war..., *rampo*, *taol-di-rampo*, *bert*, *dreist*, ur sav.

AR MACHIKOD DIR

D'ar Sul 11 a viz Gwengolo, troserriñ boul-tenn e Kergoad Kemenven, gant gwellañ c'hoarietien ar bed.

Komz galleg evel an tele...



Gwendal Denez

Poent bras eo deomp, plouked ma'z omp, ober ur striv diwezhañ evit bezañ diblouezet da vat. Graet eo bet al labour kentañ gant mistri-skol an Trede Republik a-daolioù bazh, a-dalioù mezh, a-daolioù simbol, a-daolioù botez, a-daolioù reolennoù-yezhadur da vezañ desket dre'n efivor, a-daolioù meilh-dorn, a-daolioù sach-blev, a-daolioù fablenoù La Fontaine (rhaaa lovely!), a-daolioù nozañsetreulegolwa, a-daolioù katekiz (hini an Iliz pe hini ar Republik, difore'h ebet), a-daolioù mezh adarre (ur wech ne oa ket a-walc'h...), al labour kentañ-se, neuze, en deus bet graet kalz vad deomp rak a-drugarez d'ar galleg eo e voemp sammet e-barzh tren ar

sevenadur hag an arakaadur. E bagon al loened e oamp, avat, met petra 'verne peogwir e oamp E-BARZH an tren. Laouen hag evurus-bras e oamp rak goût 'ouiemp e servije ar galleg da «diffuser des idées facteurs de progrès et favoriser la prise de conscience des libérés et des droits de l'homme» (lennet er c'hele 'hlizher "La francophonie à l'école": un devezhiad studi a zo bet aozet er skolioù war an danvez-se d'an 21 a viz Meurzh 1988 gant Ministrerezh an Deskadurezh).

Muioc'h a amzer hon eus bet ezhomm evit koll pouez-mouezh lous ar brezhoneg a lakae war ar galleg a gomzemp liv an darmechu, ha dont 'ra atav, gant ar re varrekañ zoken, un a re hir pe un o re verr, ur "troll-dirrol", ur gensonenn vouezhiet e-lec'h unan divouezh, hag all. Ha fall eo kement-se evit hol look. Rak dav eo deomp, plouked, kompren ez eo kudenn ar pouez-mouezh heñvel ouzh hini an enbroider; bez' ez eus ar re a vez asantet ha bez' ez eus ar re 'vez dav skarzhañ. Pik! Hini ar brezhoneg, anat eo, a zo da vezañ renket en eil lodenn. Tra da welout gant «L'assa channtañ du midi», an hini a lak "heol en ho mouezh"... Arabat digalonekaat, avat. Dofivaet 'vez pouez-mouezh ar brezhoneg dre forzh embregañ (labo-yezh, sonenroller, h.a.).

Chom a ra ur bazenn c'hoazh a-raok tizhout pal diwezhañ an danvez-galleg: komz galleg evel an tele. Deut eo an tele da vezañ tad, mamm, skol, iliz, sindikad, meleour, bitailh ha toull-distro an tiegezhioù. Kudennoù, dudioù, faltazioù,

prederioù an tele a zo bremañ re an holl: marc'had al lodennoù ha buhez kriz Jakez Peutiporteur, hag-ef e chomo Jerom Slibar war an 17 ha mont a ray war ar 57 piv a lenno ar c'heleier war an 3? ha gounit 'ray Dominique Calgon ur gegin Mochika goude respont da c'houlennoù droch Jean-Loup Balebros? Hep disoñjal ar paridakar!

Ha ma vefec'h galvet d'un abadenenn bennak, un deiz, dre zegouezh? (Evit gwir, n'eus "degouezh" ebet dav eo kaout un dra bennak da werzhañ — levr nul, pladenn c'hwitet, film droch — pe neuze bezañ mestrez hennezh, kariadig hemañ — pe ar c'hontrol — pe 'hoazikaramarad-breur-an-hini-rawar-dro-ar-meteo). Setu un toulladig kuzulioù 'vit 'n em zifreñ:

1. diskouezit diouzhu n'oc'h eus netra denennus da lavarout;
2. arabat groñs respont "ya" pe "nann" d'ar goulennoù droch vo graet: e-lec'h "ya" (oui) lavarit: *complètement, absolument, tout à fait* (brav eo ivez lârot div pe deir gwech ar gerioù-se), pe c'hoazh effectivement; e-lec'h "nann" (non), lavarit: *pas du tout* pe *du tout* pe *du tout-du tout*;
3. bezit lenk ("smooth", "lisse"), da lârot eo, lavarit traoù 'vo an holl a-du ganto, hep fulorif, hag hep tagañ den ebet («des restos du cœur, j'dire, c'est complètement euh... j'dire, complètement»);
4. klaskit kaout ur menoz war gement kudenn, pa n'ouzit ket eus petra zo kaoz zoken (ha dreist-holl pa

n'ouzit ket...) «L'agriculture... j'dire... c'est complètement essentiel».

Geriadurig ha doareoù-komz ar snobelezh

- je veux dire (a bouez bras silañ hennezh meur a wech en e brezeg): «j'veux dire, j'dire, aj'dir...»
- quelque part: «quelque part, j'dire, c'est complètement utile... bon, euh... j'dire, quelque part...»; «quelque part, ...il est euh... ajdir... complètement ailleurs...»
- ça m'interpelle (quelque part...)
- euh... aah... da vezañ silet er gaos a-vare ('n ur ober van da brederiañ don-don)

- c'est d'enfer: «ouaah le plan... complètement d'enfer, le plan...»
- (le) plan. Ma fell deoc'h mont da zebriñ krampouezh, digarezit, caviar, e vo ret kinnig: «on s'fait un plan... euh... un plan caviar...»
- répondre «complètement... tout-à-fait-tout-à-fait... d'enfer le plan caviar...»
- Brav ivez respont «oh, le plan!» ha netra all.

- é [e] dibenn ar gerioù a vo distaget é [e];
- e mut e dibenn ar gerioù a vo distaget gvel ur seurt e/a. Evit distagañ ar "vogalenn"-se ne dalvez ket ar boan e vefe er reizhskrivadur: «super = suupperra»; «c'est un fait = c'est-à-faita»;

- besteediñ 'n un doare "skiantel" a lak da grediñ emao'h o prederiañ... «si j'ai décidé de venir = s... s... si j'ai décidé de... de... euh... de venir...»
- lezel a ran a-gostez, a-raoizh rak die' hizet int un tammig bremañ, an nebeut dreist "verlan" a zo bet implijet ur mare 'zo bet: «bléca (cablé), chébran (branché), laisse béton (laisse tomber)» h.a.;

- arabat disoñjal kregiñ gant an anv-gwan: cheuc'h-cheuc'h eo: «grand le mec, grand!» «géant le film!» «dure la vie, dure!»;

- klask lakaat da dalvezout kudennoù a bouez hag o displegañ sklaer (titloù pennadoù da skouer): «De Gaulle est-il gaulliste?», «Marx est-il marxiste?» hag all, «Désastre de l'économie ou économie du désastre?» (un distrik intello, marteze), «La fuite des cerveaux et les cerveaux de la fuite» (!!!).

Setu bremañ mesk-divesk un

toulladig gerioù ret-ret, un doare "geriaoueg diazez" da glokaat pezh 'zo a-us:

en situation de...: «chuis effectivement... bon... euh... j'dire... en situation de recherche...»;

se positionner/dire positionné: «I est complètement positionné sur la trajectoire de...»;

urgencesentiment d'urgence: «j'dire... il y a effectivement un sentiment d'urgence dans c'film... j'dire...»;

effectivement (koublet alies gant bon), distagañ affectivement: «bon, effectivement euh... chuis d'accord»;

craindre: «ça craint, la pluie... j'dire, complètement», «craignos le plan, absolument craignos»;

géant: «géant le film, complètement»;



créatif (ur genaoueg karget da ijinañ sloganoù bruderezh, setu dres petra eo "un créatif"): «c'est complètement un créatif, le mec j'veux dire»;

décideur (an hini a gerner ur benn riski gant e wenneien); galérer/la galère (pa ya fall an traoù): «c'est la galère», «c'est tout-à-fait la galère», «quelle galère!»;

créneau: «c'est un bon créneau (coco)»;

porteur: «c'est complètement porteur, j'veux dire»; incontournable/il faut raison garder/une tempête dans un verre d'eau, a zo o koll lañs. Diouzh ar

c'hiz eo deut ar gerioù-se a-drugarez (en abeg?) d'ar bolitkourien;

maximaliste/minimaliste: «j'aime complètement le rock maximaliste...», «chuis tout-à-fait pour la pub minimaliste... aj'dire» (a bouez bras: ret-groñs eo kaout ur menoz war ar bruderezh. N'eus forzh peseurt menoz, met un menoz. Dalc'hit soñj: «la pub... euh... j'dire... c'est complètement porteur...»);

complètement: 'n ur lenn ar skouerioù 'm eus roet a-us hoc'h eus merzet pegen pouezus ha talvoudus eo ar ger-se. Ur ger diazez (gant j'veux dire). Cheuc'h-cheuc'h dirak an anv-gwan: «c'est complètement beau... j'dire»;

au niveau de: «c'est bon, coco, au niveau du discours...»;

planer/planant/ça plane: ar c'hontrol eus la galère; bez' ez eus ur strobad gerioù saozneg: «c'est un must»; speed/speedé, hard/hardos, destroy/complètement destruy, glamour, fun/c'est fun.

Ma, setu aze un toullad evezhiadennoù notennet war ar prim. A-dra-sur n'eo ket klok al listenn. Gant ho sikour deoc'h-c'hwil, lennerien, e vo kendalc'h bet da zastum lavaroù ar galleg nevez... kent sevel ur yezhadur!

GWENDAL DENEZ

AL LIAMM



KELAOUENN LENNEGEL
BEP DAOU VIZ

koumanant-bloaz 140 lur

Kas ar chekennoù da:

Per Ar Bihan
16, stradaed «des Fours à Chaux»
35400 SAINT-MALO

Maodez Glanndour
KREGIN-MOR
Prederiadennoù
256 pajenn
priz: 87 lur

EMBANNADURIOU
AL LIAMM

Kasit ho chekenn da: Dim. J.
Queillé, 20, stradaed «du Petit
Trotrieux», 22200 Gwengamp



LAN TANGI

Nadir

Perak out deuet ?
 Pa ne oa ket ar poent
 Da zigeriñ
 e pradoù tener ha tanav
 e liorzhoù flourik-flour ha dourek
 Huñvreal a rez en ul lec'h
 'M eus aon tostaat outañ
 E-kreiz ar c'helc'h strobiniellus
 Emaout o c'hortoz ac'hanon
 Elfenn
 O tarzhañ eus un tan o verbel
 Stivell
 O strinkañ eus pinvidigezh an douar
 Etrezek peseurt feunteun achantet
 'Teus beret
 Betek ar minic'hi berrbadus
 Un ehan
 Evit kemer da alan
 'Raok mont da vouskanañ
 Da ganaouennoù splann
 Etre gwez-avaloù ha parkeier an douar
 Skuilhañ ne rez ket da zour war ar bed
 Chom a rez er porzh
 Hag ar boan a spont ac'hanon
 E-kreiz ar gouloù-deiz
 Ken skrijus ha ken kriz
 Envel a raimp ac'hanout Nadir
 Hag echuiñ a ri da redenn d'an dremmwel

Diwan a rez e-kreiz ar goañv
 C'hwèzh an dibenn-eost zo 'barzh an ti
 Nadir evit diskar ar garantez
 "Nous n'irons plus au bois
 les lauriers sont coupés"
 Diskenn a raimp Nadir
 Betek an neizh a c'houlenn
 Ur wech c'hoazh adstagañ an daou
 Ha neuze 'vo anavezet tommder an andon
 E chantele ar penniliz ruz
 Dev 'vo dit kuitaat ar manati
 Evit mont da vegeal an islonk
 War an tu yen
 Etrezek an deñvalijenn
 Betek stered an dindan
 Etre sklérjenn an noz
 War an tu Yin
 En ur vro n'eus enni
 Na kelc'h-c'hoari na dour pik-pik
 Krediñ a ran 'm eus klevet
 Ur chuchumuchu en amskleur
 Heklev un sonerezh diabell
 Kemeret 'teus da blas
 'Tal hor c'hichen
 Diskenn a rez bremañ Nadir
 El limboù

ALAN BOTREL

an ti-bank

Skeud an ti-bank a yae war hiraat — o treuziñ ar straed didud —, bep ma tiskenne heol miz Gwengolo a-dreñv d'e dolzenn uhel garrezek. Em ledañ a rae lanv an disheol, o tostaat ingal ouzh ar c'hantreer en tu all d'ar straed. Kousket-mik e oa, en e c'hourvez, harpet e benn hag e zivskoaz ouzh ar menk sko ouzh ar vogger wenn, a restaole tommder heol an endervezh. Dre bep div wezh e save en e gorzailhenn roc'hadennoù kreñv, o klask ober o hent dre e c'henoù digor-bras stanket gant e deod tev. En e gichen e oa un hanter voutailhad gwin ruz, krog e zorn kleiz enni. Edo skeud an ti-bank oc'h aloubiñ ar riblenn en tu all d'ar straed. A-nebeudoù e teuas da lipat treid ar c'hantreer. Steuziñ a rejont en disheol, roud erbet ken anezhe. A-feur maz ae skeud an ti-bank war-raok, goustad-goustad, en em ziverke, tamm-ha-tamm, korf ar c'hantreer. Koazhet e oa e zivesker penna-da-benn. Krog e oa ar skeud da grignat e gof bihan ha sevel a rae bremañ betek e boull kalon, betek e avu. Derc'hel a rae ar c'hantreer da roc'h'al pa redas ur gridienn hir penna-da-benn gant pezh a vane eus e gorf. Freskizion an disheol en lakaas da zivorediñ ha, goude digeriñ e zaoulagad, e klaskas kas an hanter voutailhad d'e ziveuz. Ne zeuas ket a-benn. Morzet e oa outañ e-unan. Seizet. Stourm a reas, strivañ, ha chom difiñv. Sellout a reas ouzh ar voutailhad a oa krog e zorn enni. Ar gwer a sante, stok ouzh e vizied hag ouzh e balv. Aze edo ar voutailhad, e zorn n'edo mui. E gorf a oa diwelus. Sellout a reas ouzh e vruched ha gwelout lanv lent skeud an ti-bank o sevel prezour gantañ, ouzh e lonkañ. Disloagal a rae. Yen-holl e oa dezhañ. Ha fiñval ne rae tamm, na garmiñ. Flaer e c'henoù a voe diverket buan ha spouron e

zaoulagad debret a-herr. Fresk e oa bremañ ar vogger wenn na vane en he harz nemet un hanter voutailhad gwin.

Ur c'hantreer all, draihet e zilhad, joget e zremm, kropet e gorf, a zeuas war-wel e korn ar straed, e-kichen an ti-bank. Klask a rae e gedpar. Sellout a reas tro-dro, gwelout ar voutailhad gwin, tostaat, sellout adarre. Ur c'hruz a reas d'e zivskoaz, kemer an hanter voutailhad ha mont kuit en ur c'hrozmolat: "...echu e dommadenn gantañ... benn arc'hoazh 'vo ret din dont abretoc'h... n'eus lec'h gwelloc'h erbet e kêr da dommheoliañ er mare-mañ eus ar bloaz...".





Ar Chiminaou

Erwan ar Moal

Setu amañ soñj Roparz Hemon war bezh-c'hoari Dir-na-Dor. Embannet e oa bet ar pennadig-mañ e-barzh *Gwalarn* Nnn.4 Goavñ 1925.

Da gentañ-holl e fell din lavarout ez eo ar pezh-mañ unan eus ar re wellañ am eus lennet e brezhoneg. Hag ouzhpenn: an oberennoù a lavarer droug diwar o fenn a vez peurliesañ ar re a soñjer kalz a vad war o divoud.

Danevell ar mab foran lakaet war ar c'hoarilec'h evit an nousepvet gwech. A zo reizh: an danevelloù brav n'int ket stank. Fur eo derc'hel dezho.

Traoù mat a zo er pezh-mañ. Meur a wech, blaz pezhioù-c'hoari gwellañ Iwerzhon ha Kembre a zo gantañ: hevelep poell, hevelep uhelegezh, hevelep barzhoniegezh eeun.

A-wechoù hepken. A-wechoù all: diwirionder, divlusted ha ragach. Pet den a gaver e danevell an Aviel? Tri.

Pevar c'hoarier a vije bet a-walc'h amañ: an tad, ar vamm, ar mab, ar verc'h.

Ar c'hoarierien all (tri ez eus anezho) ne reont netra nemet lakaat ar pevar c'hoarier pennañ da gomz — stankañ an toulloù na vijent ket bet graet gant un oberour e dije gwelloc'h anavezet e vicher. Setu brasañ si ar pezh-mañ: re a dud war al leurenn, re a brezegenoù a-zehoù, a gleiz, en a-raok hag en a-dreñv.

(Pa lavaran ne ra an tri c'hoarier all netra e fazian. Klasket eo bet lakaat buhez en unan anezho: gwelout a reomp «danevz-pried» ar mab foran! A c'hall bezañ mat en ur melodrama. Ne zere ket, avat, ouzh ur pezh-c'hoari evel hemañ.)

N'hor bezo biken pezhioù mat en Breizh mar n'omp ket evit meizañ — evel m'o deus meizet Yeats ha Synge en Iwerzhon —, e tle bepred, en ur pezh berr e komz-plaen, ar fetisted bezañ en he brasañ. Da lavarout eo: ne dle bezañ nag un den, nag ur gevrenn nag ur ger ouzhpenn an dud, ar c'hevrennoù hag ar gerioù rekis. Da lavarout eo: e ranker bennañ, diskourañ ur pezh-c'hoari e pep giz, ken na chom ennañ nemet ar pep reañ, ma c'hello ar sabr redek drezañ fonnus ha kreñv.

Lennit en eil niverenn «Gwalarn». Ar C'houmoul a Dec'h, ha lennit Ar Chiminaou, hag e welot ar c'hemm diouzhtu.

Notenn: Savet en deus Roparz Hemon e-unan ur pezh-c'hoari diwar istor ar mab foran: «Fest al Leue Lart» (C'hoariva 1).

Un ti diwar ar maez, ha div zor warnañ, unan a bep tu. Gwiskamantoù a-c'hiz vremañ.

C'hoarierien:

- Erwan, mab Turwal, 28 vloaz
- Turwal, labourer, 55 bloaz
- Marianna, gwreg Turwal, 60 vloaz
- Marc'harid, merc'h Turwal, 19 vloaz
- Anna, c'hoar Turwal, 65 bloaz
- Monig, matezh vihan, 14 vloaz
- Soaz, danevz-gwreg Erwan, 15 vloaz
- Daou archer (na vezint ket gwelet).

ARVEST 1

DIVIZ 1 (Marianna, Marc'harid)

Marc'harid (d'he mamm a zo o tont en ti):

Perak, mamm, oc'h savet ken abred-mañ? En deizioù all, e chomec'h en ho kwele betek nav eur? (Marianna a ya da zigeriñ ar pres ha ne respont ket)

Mamm, lavarit din eta perak oc'h savet ken abred-mañ? (Marianna a furch er pres, ne respont ket)

O, mamm, perak ne respontet ket ac'hanon?... (O avelañ) Petra 'm eus graet deoc'h? (O vont da greiñ en he dorn ha da bokat dezhi) Perak ne chomit ket en ho kwele peogwir oc'h klañv?

Marianna (o kempenn he dilhad): D'an oferenn, ma merc'h, da drugarekaat an aotrou sant Erwan benniget... da vevañ digaset ho preur d'ar gêr.

Marc'harid (mantret): Ma breur d'ar gêr? (Gant spont) Ma Doue! Mamm eo troet he spereid!...

Marianna (oc'h echuiñ d'en em wiskañ): Ya, hiziv e weloc'h ho preur... An aotrou sant Erwan en deus diskouezet din fenez dre ma c'houk... (Gant nerzh) Hag an aotrou sant Erwan, biskoazh n'eo manket din! (Gant ur vouezh tener) Ma merc'h, livirit war ma lerc'h: "Ra vo meulet hag enoret an aotrou sant Erwan en deus, goude seizh vloaz, digaset d'ar gêr ar bugel kollet!" (En he soñj hec'h-unan) Ya, seizh vloaz a vo d'ar foenn abaoe m'eo partiet ha tri bloaz zo tremenet abaoe n'em eus bet keloù ebet digantañ!!! — Livirit ganen, ma merc'h: "Ra vo meulet ha benniget an aotrou sant Erwan!"

Marc'harid (an daeroù en he daoulagad): Ra vo meulet hag enoret an aotrou sant Erwan!!

Marianna (seder): Bremañ me a ya d'an oferenn!

Marc'harid: Mard oc'h kreñv a-walc'h, mamm, da vont betek ar bourk?

Marianna (o tizreiñ 'n ur vont er-maez): An aotrou sant Erwan a zo o sikour ac'hanon. Fenez, eñ en deus rentet din ma nerzh. (Mont a ra er-maez.)

DIVIZ 2 (Marc'harid)

Marc'harid: Me ya da c'hervel Monig da vont war he lerc'h!... Monig! Monig!

DIVIZ 3 (Marc'harid, Monig)

Monig (o tont): Ezhomm 'peus ac'hanon-me, Marc'harid?

Marc'harid: Ya!... Mamm zo aet d'ar bourk d'an oferenn. Emañ o paouez mont er-maez eus an ti... Kerzh war he lerc'h diouzhtu ha taol pled mat outi... Aon am eus na gouezhe waran hent...

Monig (souezhet): Moereb a zo savet?...

Marc'harid: Ya! Kerzh 'ta ha hast buan! (Monig a ya er-maez prim.)

DIVIZ 4

Marc'harid (hec'h-unan, o kroaziañ he daouarn): Biskoazh n'am boa gwelet mamm evel-se!... Sur-mat emañ o tanzen koll he fenn gant an drubuilh!... Dre forzh soñjal em breur ha gortoz eus e geloù, eo deuet mesket he spereid.

Un toullad deizioù zo ne rae nemet komz din eus a sant Erwan... Hiziv eo anat n'emañ ket ken en he spereid vat! «Sant Erwan, — emezi —, he deus gwelet!... Ma breur a erruo hiziv!» Siwazh! Huñvreoù holl eo kement-se! Ma breur a zo marv, moarvat, ha piv 'oar pelec'h, du-se er broioù krec'h?... Tri bloaz zo hep keloù ebet dioutañ!...

Ma 'dije gallet mamm ankounac'haat, da vihanañ!... Met ne soñj nemet ennañ! Ma zad ne gomz anezhañ gwech ebet ha mamm emañ he fenn gantañ dalc'hmat!... Hag o-daou emaint aze, koulz an eil evel egile, o tisec'hañ diwar ozreid!

Ma Doue! Pegen trist eo an ti-mañ! N'eo ket bara a vank, koulskoude, met abaoe m'eo partiet ma breur, abaoe seizh vloaz, ma zad ha mamm n'o deus graet joausted ebet. Kañvoù a zo en ti-mañ abaoe!... Ma zad a zalc'h da vont, ha ret dezhañ, abalamour d'e labour, peogwir n'eus nemetañ hag un devezhier... Met setu, mamm 'zo o ruzañ daou vloaz zo... ha bremañ, mard eo deut sot!... O ma Doue!

mar en dije gouvezet ma breur, pa oa o tec'hel rok e benn, peseurt reuz a sache warnomp!!!
...Hemañ 'zo un ti kollet!
(Gouelañ 'ra.)

DIVIZ 5 (Soaz, Marc'harid)

Soaz (o tont gant pres): Me 'm eus klevet e oa tremenet moereb Marianna e Kroaz ar Run, bremañ souden? Ha gwir e vefe?

Marc'harid (trist): Ya, Soaz, aet eo d'an oferenn!

Soaz: Erru eo ya'ch?

Marc'harid (o huanadiñ): Gwashoc'h 'vit kleñved a zo deut dezhi!

Soaz: Petra?... Gouelañ 'rez? Hast kontañ din petra 'zo erru?

Marc'harid: Me 'm eus aon n'he deve mamm kollet he skiant ar wech-mañ!

Soaz (mantret): Petra 'lavarez?

Marc'harid: A-greiz-holl eo savet eus he gwele, aet d'ar pres da glask he dilhad... Gwelet he devoa sant Erwan en noz-mañ, emezi, hag e oa o vont d'ar bourk d'e drugarekaat...

Soaz (sousezhet): D'e drugarekaat?

Marc'harid: ...Rak disklêriet en devoa dezhi e oa hiziv an deiz... da... da... ma Doue! paour-kaezh mamm!

Soaz: Lavar 'ta!... An deiz da betra?

Marc'harid: An deiz da... da... Erwan d'erruout er gêr!

Soaz (o cheñch liv, 'n ur bouezañ war bep ger): An deiz da... Erwan d'erruout er gêr?

Marc'harid: Huiñvreoù, paour-kaezh plac'h! He spered a zo aet da redek!... Aet eo, — ha ne dalveze ket din aesaat harzh anezhi! — aet eo d'an oferenn da drugarekaat an aotrou sant Erwan... Me 'm eus kaset Monig war he lerc'h, bete-goût 'n errufe droug ganti.

Soaz (en he soñj hec'h-unan): Neuze eo krefivaet kalz, da vihanañ, peogwir eo aet d'an oferenn?

Marc'harid: An aotrou sant Erwan, emezi, en devoa degaset nerzh dezhi.

Soaz (eviti hec'h-unan): Seblant e c'hallfe ivez degas...

Marc'harid (hag he deus klevet): Siwazh, plac'h paour! An derzienn 'n hini oa o souten mamm! Ma'z tije gwelet pegen lemm e oa he daoulagad! Na pa vefe ret degas anezhi d'ar gêr gant ur c'harr, ne vefen tamm souezhet.

Soaz: Ha da dad, goût a rakement-se?

Marc'harid: 'Ra ket, a c'hras Doue! Emañ er park. Met pa ouezo, eñ ha n'eo ket evit gouzañv e vefe lâret, zoken, anv Erwan dirakañ...

Soaz: Bepred?

Marc'harid: Bepred? Gwashoc'h 'vit biskoazh! Seul vui e wel mamm o kemer trubuilh gant Erwan, seul-vui e teu e spered da drenkañ hag e sav droug ennañ 'enep dezho o-daou. En deiz diagent de'ch, Fañch an devezhier a lâras ur ger bennak diwar-benn ma breur, e-pad koan... Darbet e voe d'am zad teurel anezhañ er porzh raktal!... Pa c'hoarvez traoù evel-se, mamm, neuze, a ya er-maez anezhi hec'h-unan. Tamall a ra pep seurt traoù d'am zad; lavaret a ra dezhañ eo un den kriz, na gar ket e vab, na gar ket e dud!... A! amañ 'vez buhezioù! Ha soñj pebez rann-galon evidon! Me 'oar a-walc'h eo gant ma zad emañ ar wirionez; met n'hallan biken mont enep da'm mamm, pa welan anezhi prest da gouezhañ diwar he zreid!...

Amañ 'vo un devezh c'hoazh hiziv! Krenañ 'ran gant ar spont, pa soñjan; Bremañ souden, da greisteiz, ma zad a erruo d'e verenn ha pa glevo...

Soaz: Berzh moereb da devel.

Marc'harid: Ne selaoou ket a'chanon an disterañ!... A-hend-all, aon am befè da greskiñ he foan!... He spered a zo aet kement 'barzh ma breur! O! ma ouezfe hennezh nag a zaeoù 'zo bet skuilhet amañ abaoe m'eo partiet rok e benn!

Soaz (trist): Ouzhpenn amañ 'zo bet skuilhet daeroù!

Marc'harid: Ya, Soaz kaezh, me 'oar a-walc'h, te 'peus bet ivez poan-galon: ouzhpenn ur wech! Graet promesa dit da zimeziñ, ha mont en-dro ha tremen hep reiñ keloù. Ha bepred out chomet feal dezhañ?

O! ya, ma ouezfe pegement eo karet amañ! Betek ma zad am eus tapet un devezh, ha n'eus ket pell c'hoazh, o ouelañ dirak poltred Erwan, ar poltred en devoa tennet a-raok e

servij, kent mont d'ober e vloaz. Ya! ma Doue, ma ouezfe petra en deus diprized. Met bal petra 'dalv hirvoudiñ! Moarvat ne glevo ken a'chanomp; marv eo ha, marteze, 'baoe pell zo!

Soaz: Na lavarez ket se, Marc'harid, en an' Doue! Re a boan a rez din! Biken ne gredin eo marv! Me 'zo 'vel da vamm; me 'c'hortoz bepred, bepred!

Marc'harid (a-gostez): Paour-kaezh plac'h!

(Klevet a reer trouz ouzh an treuzioù.)

Soaz (o sellet): Erru 'zo unan bennak.

Marc'harid: Daoust ha mamm e vefe?

Soaz (o sellet adarre): N'eo ket! Ur paour bennak pe ur galouper, diouzh gwelet e stumm!

Marc'harid: Serr an nor, ne zeuio ket en ti!

Soaz: Deut ha tout eo!

Marc'harid (o vont da serriñ an nor hag o souzañ): O ma Doue!

(Tostaat a ra Soaz.)

DIVIZ 6 (Ur chiminaou, Soaz, Marc'harid)

Ar c'haezh: N'ho pet ket aon! Me n'on ket deut amañ d'ober droug... Met un tamm bara a rafè vad din!...

Marc'harid (da Soaz): Troc'h un tamm bara dezhañ! (Soaz a droc'h bara ha Marc'harid hen c'hinnigeus a-bell d'ar galouper.)

Ar c'haezh (o sellet outi ur pennad, dilavar): Trugarez! (Mont a ra er-maez)

Marc'harid (o vont da serriñ an nor war e lerc'h): Dibaot eo gwelet un den ken stummet fall! Me 'm eus bet aon ken e krenan c'hoazh!

A drugarez Doue, e oas aze ganin!... N'ho peus ket taolet pled peseurt selloù en deus graet en ur zont en ti?

Soaz: Bal! An dud-se alies n'int ket ken fall da gavout 'vel da welet!

Marc'harid: Ac'h! Rukunus eo gant e zilhad lous ha truilhennek hag e varv hir ha luziet! Gwelet ez peus ivez peseurt pikol treujenn a oa gantañ oc'h ober ur vazh? Ma ne vijes ket bet amañ, n'ouzon ket pelec'h e vijen em vountet en e raok! Chom ganen gant aon na zizrofel!... Peotramant, serromp an nor ha deus, ma'z aimp da Bark ar Stank da lakaat dilhad da sec'hañ... Eno 'zo merched o kannañ...

Pa vo alc'hwezet an nor, ne zeuio ket en ti. Ret eo din avat, lakaat an alc'hwez dindan an treuzioù, bete-goût na zizrofe mamm ha Monig e-keit-se... Deus!...

Soaz (o chom a-sav): Da vamm a gred dezhi e teuio Erwan hiziv d'ar gêr. Marteze eo hennezh eo Erwan?

Marc'harid: O Soaz! Serr da c'henoù! N'ouzout ket petra 'lavarez!

Soaz: Petra az pije graet, mar en dije bet disklêriet dit: Me eo Erwan, ho preur!

Marc'harid: Na gomzez ket din a draoù evel-se! Me 'oar petra 'n bije graet?? A draoù evel-se! n'eo ket Erwan eo! Erwan n'eo ket kromm, na livet-fall na ken don-se e zaoulagad en e benn, na ken garv-se e vouezh...

Soaz (n'he soñj): Seizh vloaz a zegas cheñchamant en un den!... Deomp da lakaat da gouez er-maez!

DIVIZ 7

Ar chiminaou/Erwan (o tizale'huwezañ an nor hag o tont en ti): Dindan an treuzioù 'vez lakaet bepred an alc'hwez!

(Ur pennad mat e chom da sellet en-dro dezhañ hep komz.) N'eus mann cheñchet dre amañ! N'eus nemedon hag en deus cheñchet! Na ma c'hoar na Soaz n'o deus anavezet a'chanon!... Rukun o devoa ouzhi!... Mar galle an traoù amañ komz, moarvat e lavarent din ivez: "Kerzh er-maez, hailhon!"

A! N'eus forzh! Amañ emañ er gêr! Kaer o devo an dud hag an traoù rebarb ouzhi: "Kerzh er-maez, chiminaou!" bepred emañ

Mouladurioù Hor Yezh 1988

Tereza Desbordes, 1, plasenn Ch. Peguy, 29260 Lesneven

Fulennou an Tantal, *Bernez Tangj*, 45 l.
Dev an Avel, *Koulizh Kedez*, 45 l.
Barzhaz, *Abeozen*, 75 l.
La Trame d'une Langue: *le Breton*
Jean-Yves Urien, 120 l.



HOR YEZH

KELAOUENNA YEZHONIEZH

KOUMANANT (4 niverenn): 80 lur.
Yann Desbordes, 1, plasenn Ch. Peguy, 29260 Lesneven

niverennoù er-maez rummad:

K.E.A.V., Anna ar Beg
Kroaz ar Vretoned, Gerard Cornillet
Dihunamb, Daniel Carre

er gêr hag amañ e chomin! C'hwî 'gav deoc'h ne ra ket a vad erruout er gêr goude bezañ bet seizh vloaz hep gêr ebet? Ma n'ouzont ket se amañ, me 'oar! Ya, un dra vat eo erruout er gêr! (Izeloc'h) Hag un dra fall eo he c'huitaat. (Oc'h azezañ) Ret eo din erruout amañ 'benn gallout diskuizhañ... Seizh vloaz zo ne oan ket bet 'n em aez evel m'en em gavan amañ, e korn an oaled, o krignat an tamm bara sec'h stlapet din gant ma c'hoar!

...Ya sur, kemer a raint ac'hanon evel ma'c'h on ec'h on! Lakaat a raint ac'hanon, ma karont, e loch ar c'hi, met n'in ket ac'hann ken!

(O sevel hag o skeiñ gant e vazh) Ya, ya! Me 'oar a-walc'h pep hini a lavaro e c'her: "Te? Piv out-te? Un hailhon! Un den digalon! Un ever! Ur fouet-boutik! Ur galouper! Ur chiminaou!" Ya, ya! Met bepred Erwan an Turwal eo ma anv! Aze, er gwele-se on bet ganet! Er gwele-se em eus kousket e-pad ugent vloaz! Hennezh a oa ma fres! Homañ oa ma skabell! Den n'hall lavaret n'emaon ket amañ er gêr! Ha koulskoude, marteze 'vin kaset kuit! Ma zad, ma mamm, a lavaro din: "Pa oamp 'kas gwelet ac'hanout o chom, e oas aet 'n ez tro; bremañ, p'emaout 'kas dizreiñ, kerzh adarre! N'eus ezhomm 'bet ac'hanout ken! Kemeret eo da blas!"

'Vit kelou-se, n'on ket marv!

Sur a-walc'h, o devo mezh ganen! Ne gredint ket anzav ac'hanon... Me a oa ur paotr moust gwechall... Sell 'ta, sell aze e-pign ouzh ar prenestr ma foltred tennet er bloaz ma oan aet d'ober ma servij.

(Sellet a ra outañ en e zorn ha lezel e vrec'h kleiz da gouezhañ.)

N'eus forzh! Bepred eo me eo hennezh! Bepred eo me eo Erwan an Turwal! Ma'c'h erru ma zad aze bremañ-souden, me 'lavaro dezhañ: "Me eo Erwan!" Daoust petra 'ray? Bepred me zo mestr amañ war e lerc'h!

(Krediñ a ra dezhañ klevet trouz hag e lamm da doull an nor.)

N'eus den! Ma! Sell aze ha kentañ soñj am eus bet eo da vont kuit! Ma dilhad zo kozh! Ma vijen gwisket evel ma'c'h on war ma foltred, e vijen hardisoc'h! Marteze zo dilhad diouzh ma ment!

(Mont a ra d'ar pres, hag e tenn ur

gwiskamant, an eil pezh goude egile.)

Ma! Ur bragou! Ur chupenn! Un tog! Gant ar re-mañ, marteze, 'vin gwelloc'h stummet ouzh Erwan an Turwal a zo aze e pign!... Cheñch kroch'en eo ret din!

(Tennañ a ra e chupenn vrein ha teurel a ra anezhi eno.)

Kerzh diwar ma c'hein eta, porpant milliget ar broioù krec'h! Pell a-walc'h ez peus poazhet ac'hanon!

(Pemañ o vont da wiskañ ar chupenn all, e klev trouz hag e tec'h 'vel ul laer, o kas gantañ dilhad ha tog.)

DIVIZ 8 (Soaz, Marc'harid)

Marc'harid (mantret): Gwerc'hez Vari! Digor an nor! Digor pres ma zad! Soaz! Soaz! Al laer zo bet amañ!...

(O vont d'ar pres) Aet gantañ dilhad da'm zad.

Soaz (o kregiñ er chupenn taolet war an douar): Ar chupenn-mañ!

Marc'harid (o sellet): N'eo ket honnezh chupenn ar chiminaou 'zo bet aze 'vit ar beure?

Soaz: Eo, avat! Honnezh am eus gwelet war e gein!

Marc'harid (strafuilhet): Disfiziañ am boa e oa hennezh ul laer, diouzh ma selle en-dro dezhañ! Ec'h an da glask ma zad!!

DIVIZ 9 (Soaz, Marc'harid, Monig)

Monig (o tont en ti): Ho mamm a zo chomet ur pennad er bourk da ziskuizhañ e ti ho moereb Anna. 'Benn bremañ e tle bezañ deut ac'hano...

Marc'harid (hep selaou): Ha bet al laer amañ! 'Peus ket gwelet anezhañ war da hent?

Monig: Al laer? Piv?

Soaz: Ne peus ket gwelet un den barvek ha stummet-fall, gant ur pikol bazh hag ur bakadenn dilhad?

Monig (o hursuniñ): Nann!

Marc'harid: Daoust war be tu eo aet! Kerzh buan da glask ma zad ha lâr dezhañ dont d'ar gêr raktal!

(Monig, er-maez)

Soaz: ha ni, deomp bepred da benn hent ma mamm (Seriñ a ra an nor hag er-maez).

AR OUELA GOUEZH



EIL ARVEST

DIVIZ 1 (Turwal, Anna)

Anna: Ma breur, goût a rez, Marianna a zo du-mañ? Re skuizh e oa da zont ganen d'ar gêr. Da vrec'h a zo chomet ganti.

Turwal: Klevet em boa gant Monig e oa Marianna du-se. Met tec'h e oa se diganin!... Me 'zo va fenn gant al laer!

Anna: Petra 'ta eo al laer-se a zo bet er beure-mañ o spontañ Marc'harid?

Turwal: Ur chiminaou bennak, a zo bet aze hag en deus tapet dilhad diouzh ar pres ha kaset anezho gantañ... Ar rederien-se n'int ket tud

abaf, hemañ, da vihanañ, 'vo paket hepdale, rak kaset em eus Monig, gant ur paper, da zegmenn d'an archerien...

Met penaos emañ ar bed ivez gant Marianna? Gwellaet eo dezhi 'ta en un taol krenn? Er beure-mañ e oa 'n he gwele p'on aet d'ar park!

Anna: 'N ur stumm eo gwelloc'h ha 'n ur stumm all...

Turwal: 'N ur stumm all?

Anna: 'Vit lâret dit ar wirionez, ma breur ker, me 'm eus aon na ve deut da wreg sot...

Turwal (nec'het): Sot?

Anna: Arabat spontañ, 'velkent, rak...

Turwal: Petra 'ra dit krediñ?...

Anna: Erruet eo bet du-mañ goude an oferenn hag e kaven e oa mesket he daoulagad... 'Dal m'eo deut en ti, he deus kontet din e oa Erwan...

Turwal (taer): Erwan adarre? Na lavarez-te, da vihanañ, an anv-se dirakon!

Anna: C'hwî 'zo re daer, ma breur. Ne ven ket souezhet e ve gant aon ouzhoc'h e ve deut Marianna da...

Turwal (o troc'hañ krenn): Lavar din petra 'gonte dit!

Anna: ...He devoa gwelet sant Erwan hag en devoa disklêriet dezhi e teuje hiziv he mab Erwan d'ar gêr!

Turwal (goapaus): A?... Al laer, da vihanañ, zo deut!!

Anna: Un taol 'zo skoet 'n em c'halon: "Deue da viro!" mon-me. "M eus aon Marianna a zo o tont sot!"

Turwal: Sot eo, sur, ha war soataet bemdez, peogwir al lampon-se ne baouez ket-hi da soñjal ennañ na noz na deiz!

Anna: Ha koulskoude, mar befegwir he huñvre! Marianna he deus pedet kement evit ar paourkaezh paotr-se! Ur vamm vat, Turwal, seurt na gaver ket ken, nann, pas unan hepken!

Turwal (c'hwerv): Ha me eo fallañ tad a zo, n'eo ket gwir!

Anna: Nann, n'out ket; un den taer ha tec'h da zerc'hel droug, se ne laran ket!

Turwal (garv): Derc'hel droug? Al pennoù diboell ma'z oc'h! Un tad en e di ne dle ket plegañ, gant ar wirionez! Gwech ebet!

Anna: Ya, met ma tizrofe da vab, ne ve ket dleet dit, forzh pegen diskiant eo bet, ober degemer fall dezhañ! Pa oa tec'h diouzh ar gêr, anzav a ran e oa ar gaou gantañ penn-da-benn;

bremañ, avat, ma teufe war e giz hag e serrfes an nor outañ, e lakfes ar gaou en da du.

Turwal (*gorrek ha lemm*): Te n'out ket evit soñjal peseurt gouli a vagan aze 'n em c'hreiz abaoe m'eo paouezet ma mab da skrivañ din!
Un druvez eo, 'velkent, ma c'hoar, e teufes, war zigarez huñvreoù tud klañv, da c'hoari gant ma foan, da lakaat ma c'halon da wadañ a-nevez-flamm!...

Anna: Ne grede ket din e oas ken poaniet se!

Turwal: Nann, rak ne gomprennez ket petra eo bezañ tad — na petra eo bezañ penn-tiegezh, — na petra eo bezañ ur gwir Vreton!

Evel tad, daoust ha me 'c'hall bezañ laouen o welet ma mab o tec'hel diganin, o paouez, zoken, da reiñ din eus e gelou? Evel penn-tiegezh, daoust ha n'eo ket ur rann-galon evidon gwelet an hini a dlee kemer an dorn war ma lerc'h, o tilezel ar garg a zegouezhe dezhañ hag o leuskel an ti da gouezhañ en e boull? Hag evel Breton, rak Breton on, ma c'hoar, me oa lerc'h ennon o welet am boa ur paotr yaouank gouest da viret ha da greskiñ holl vadou hag enor hon bro c'henidik! Hag ar maleürus zo aet da werzhañ e vro ha da vastariñ hon anv... da... C'hall!...!

Anna: Da vastariñ hon anv? Te 'oar se?...

Un den aheurtet out, ret eo lavaret, Turwal!

Turwal: Aheurtet, ya, pa vez ar wirionez ganen!

Anna: Ha mar deufe da vab, hiziv pe ur wech all, da c'houlenn digor diganin, petra 'rafes?

Turwal: Me ne'm eus mab ebet ken! Gwazh evidon ha gwazh evitañ, mar deo bev c'hoazh!... Ha bremañ peoc'h gant ar gaoz-se! Ne'm eus ket amzer da goll pelloc'h! Kenavo!

Anna: Me ne'm eus mann d'ober amañ, ma'c'h

ez-te kuit! (*O-daou er-maez, pep hini diouzh e du.*)

DIVIZ 2 (Erwan)

Erwan (*o tont en ti*): Div wech on antreet en ti-mañ hiziv... An dro-mañ, an deirvet gwech, e rankan chom! Klevet em eus, eus solier ar foenn aze, e vije degaset an archerien, amañ bremañ-souden... Ret eo din 'n em reiñ da anaout! Erwan Turwal, mar deo bev ma mamm, — rak ne'm eus klevet doare 'bet diouti c'hoazh! — a gousko amañ fenez!
Sell erru ma zad!...!

DIVIZ 3 (Erwan, Turwal)

Turwal (*o chom en e sav ouzh an nor da sellet ouzh an estrañjour-se barv hir*): Piv oc'h-hu ha petra 'glaskit amañ? (*Erwan, pleget e benn, ne respont ket. Turwal a dosta outañ. Kreñvoc'h*) Piv oc'h-hu ha petra 'glaskit amañ? (*Erwan ne gred na homz na sevel e benn*) Ne deure ket e ti an dud all pa ne vez den er gêr ha serret an nor!

Erwan (*o vousekomz skeudik*): N'emaon ket e ti an dud all!

Turwal: Eo sur!

(*A gostez*) Evet en deus ur bannac'h re! Poan en deus o komz!

'N em dromplet ho po war ho hent! Pelec'h e kred deoc'h bezañ amañ?

Erwan: Er gêr!

Turwal (*a gostez*): Mezv eo!

(*Kreñv*) Er gêr? Da belec'h 'ta ho poa da vont?

Erwan: D'ar Run.

Turwal: N'oc'h ket kouezhet fall! Met lies a di a zo er Run! Da di biv e felle deoc'h mont?

Erwan (*gant nec'hamant*): Da di Turwal!

Turwal: Emaoc'h en e di ha dirakañ. (*O sellet pizh outañ*) Hag ho peus... petra d'ober... gantañ?... Ur marc'hadour bennak oc'h?

Erwan: N'on ket!

Turwal: Piv oc'h 'ta neuze?

Erwan: Me... me... me... me... me... ho mab Erwan!

Turwal (*a deu prim da sellet outañ hag a souz war e giz betek an daol hag a ro un taol dorn warni*): Ma mab? Ya, bet out! Met n'out ket ken!

Erwan: Eo, ma zad!

Turwal: Er-maez! Ha diouzhtu!

Erwan (*o sevel e benn*): Me 'zo ac'hann koulskoude!

Turwal: Ma karjes 'vijos bet! (*Kregiñ a ra 'n e vrec'h*.)

Erwan: Lazhit ac'hanon, mar kirit, amañ e chomin!!! (*Turwal en em lez da gouezhañ war ar bank-taol.*)

DIVIZ 4 (Erwan, Turwal, Marianna, Marc'harid)

Marianna (*o welet Erwan, a astenn he divreoñ dezhañ hag a gouezh hanter sement*): Ma mab!

Marc'harid (*o sellet ouzh an den, en ur souten he mamm*): Hennezh? Ma breur?

(*A gostez*) Sur a-walc'h, mamm eo troet he spered!

Marianna (*o komz*): O sant Erwan, bezit trugarekaet! (*Astenn a ra he divrec'h da Erwan. Hemañ a bleg e benn muioc'h-mui.*)

Marc'harid: Mamm, lezit hennezh! Hennezh eo ar chiminaou 'zo bet amañ 'vit ar beure hag en deus laeret dilhad eus ar pres. Dilhad ma zad 'zo gantañ!

Marianna: Ma mab Erwan! Ma mab Erwan!

Turwal (*o sevel*): Marianna, gwall brim ez it! Me 'zo mestri hag evel ma livirin e vo graet!

A-raok bezañ na tad, na mamm, eo ret amañ bezañ barnet!

(*Da Erwan*) It da gerc'hat ho tilhad ha diwiskit ar re-se! N'oc'h perc'henn ebet dezho!

Erwan (*tener ha trist*): Klevet a ran... ha sentiñ 'rin!

Mamm, lezet ac'hanon!

Marc'harid: E vamm!?!...!

Marianna: Kerzh! Ma fiziñs a zo en aotrou sant Erwan!

Turwal: Na glasket ket dislavaret ac'hanon na stourm ouzh ar pezh am eus d'ober! C'hw, Marianna, a anzav anezhañ; ouzhpenn c'hw 'zo da gomz amañ!

(*Erwan a zistro gant e zilhad.*)

Marianna (*frommet*): Gwerchez Vari! Penaos emaut, ma mab paour!

Turwal: Marc'harid, deuet amañ 'n em c'hichen!

(*O tiskouez Erwan*) Sellit outañ! Setu aze ho preur!

Marc'harid: Ma breur? O!...!

Turwal: Ho preur eo! Ho preur e vo, mar plij ganeoc'h anzav anezhañ. Setu-efi dirak ho taoulagad! Setu-efi, evel m'eo rentet, galouper ar broiud-krec'h!...

Daoust ma n'oc'h nemet ur plac'h, daoust ma'z oc'h yaouankoc'h evitañ, gwir ho peus da varn anezhañ, rak c'hw 'zo ac'hann! N'oc'h eus ket dilezet ho tad hag ho mamm! N'oc'h eus ket dilezet ho ti hag ho parkoù! N'oc'h eus ket dilezet ho pro! E-pad seizh vloaz, c'hw ho peus sikouret dougen ar samm en devoa lezet hemañ war hon choug da zoug. Ac'hanta, ma merc'h, gwir ho peus bremañ, c'hw, da zigeriñ dezhañ dor an ti-mañ pe d'he serriñ, da lavaret dezhañ: "Ma breur, deus!" pe da lavaret dezhañ: "Divroad, kerzh en-dro!"

Dibabit evitañ ar gomz a garoc'h!

(*An holl a zo dilavar.*)

Marc'harid (*abaf*): Gwir eo... oc'h... ma breur?? (*Erwan ne respont ket; plegañ 'ra e benn 'n ur dorchañ e zaoulagad.*)

(*D'he zad*) Ma zad, gouelañ 'ra! (*Da Erwan*) Gwir eo... oc'h-c'hw... Erwan? (*D'he mamm*) Mamm, sur oc'h eo Erwan eo?

Marianna (*he sellou lemm ha tener war he mab, gant ur vouezh skiltr*): Daoust ha kalon ur vamm a c'hall en em dromplañ?

Marc'harid: Neuze 'ta... neuze... me 'vo ho c'hoar. (*Luskañ 'ra mont 'trezek dezhañ, met an tad a gomz hag a grog 'n he brec'h.*)

Turwal: Galvit amañ Soaz!

AN
HERE



AR PIGOS BRAS, Daniel Kerjean, 70 lur,
TINTIN, AN ENEZ DU, Herge, 40 lur,
BISOUSIG, KAZH AN TEVENN
Abeozen, 45 lur.

Anouet ar Wenanenn Vihan, M. V. Jones, 23 lur
Ar mell Tar kozh, M. V. Jones, 23 lur
Ar Peroked, Irma Shilton, 35 lur

AN HERE
16, straed Jules Henriot
Kerdregez
29000 KEMPER

BEP NIZ
Cholori

KAZETENN AR VUGALE
12 niverenn: 145 lur
Hent-dall Kergeleñ
29112 Landudal

REY DAKU VIZ
TALABAO!
AR GAZETENN A RA TROUZ

KELAOUENN AR GRENNARDED
6 niverenn: 120 lur
Hent-dall Kergeleñ
29112 Landudal

DIVIZ 5 (Erwan, Turwal, Marianna, Marc'harid, Soaz)

Soaz (o tont en ti): Setu-me, ma eontr!

Marc'harid (da Soaz raktal): O! Soaz! dizro eo Erwan!

Soaz (o sellet en-dro dezhi, abaf): Pelec'h?

Turwal: Tostait!... Setu aze Erwan!

Soaz (souezhet ha touellet): C'ha! Al!...

Turwal: Setu aze danvez ho pried! Anzav a rit anezhañ c'hoazh? (Soaz a chom mut, he sellou mantret war Erwan, Hemañ a damsav e benn hag a ra ur sell tener ha trist outi.)

Marianna (azezet, o kuzhañ he daoulagad gant he daou zorn): Pebezh merzherenti! Velkent!

Turwal: Al lezenn 'zo evel-se! N'eo ket a-walc'h karantez! Da gentañ, ARJUSTIS!

Soaz: Gortozet em eus Erwan e-pad seizh vloaz. Bet on feal dezhañ. Fiziañs am eus eo bet feal din...

Erwan (izel): Ya! (Ur poz ha war greñvaat, dre ma komz) Pa guitais ar gêr, ne ouien ket da belec'h ec'h aen... nemet e fizien barzh lavarioù tud hag am boa anavezet er c'hazarn... Hepdale e ouezis e oan diroutet hag a damm da damm e kollis kalon da labourat... Revolusionerien a glaskas serriñ ac'hanon, met n'is ket d'o heul... Ne gaven ma fijadur neblec'h...

Marianna (he sellou lemm warnañ, gant jestroù): Paourkaezh bugel!

Erwan: Ne greden ket dont d'ar gêr na, zoken, skrivañ, bete-goùt am bije bet ur gwall respont digant... digant ma zad!... Gwell e oa ganin dont ma-unan da glevet... (Ober a ra ur sell ouzh e dad ha ne respont ket. Ur sell all ouzh Soaz.)

Soaz (o vont war-zu dezhañ): Me 'lak ma dorn en hohini, Erwan!

Turwal (o kregiñ 'n he brec'h): Gortozit!... (Trouza glevet.)

DIVIZ 6 (Erwan, Turwal, Marianna, Marc'harid, Soaz, Monig)

Monig (da Durwal, 'n ur sellet ouzh Erwan): Daou archer a zo aze ouzh toull an nor hag a c'houlenn kaozeal ganeoc'h, ma eontr. (Hep lâret ger, Turwal a ya er-maez. An holl a chom mut ha spontet.)

Marianna: Aotrou sant Erwan! Sellit a-druez ouzhimp! (Turwal a deu soudan war e giz; e c'hoar Anna 'zo kercent war e lerc'h.)

DIVIZ 7 (Erwan, Turwal, Marianna, Marc'harid, Soaz, Monig, Anna)

Anna (bec'h warni, da Durwal dre drek e gein): 'C'hanta? Kavet eo al laer??

Turwal (pint deut o-daou en ti, gorrek ha tener): Nann! Al laer a zo kollet. Met... ma mab am eus kavet!! (Erwan a strink da bokat d'e dad.)

AR OUELA GOUEZH EVIT MAT

(Emglev Sant Ildud)

Erwan ar Moal

Erwan ar Moal, eus e anv-barzh *Dir-nador*, a zo war un dro ur barzh kizidik ha fromus hag ur skrivagner c'hwek e gomz-plaen. E eil zastumad kontadennoù, dindan an anv *Pipi Gonto*, eo en deus diskuliet deomp ez oa e brezhoneg lennegezh estreget *Buhez ar Sent*.

Ganet eo Erwan ar Moal e Koadoù, tost da Wengamp, d'an 9 a viz C'hwevrer 1874. Goude stagan gant ar studi da vont da veleg, e tistroas war ar maez hag e reas hepken war dro e zouar hag an Emsav Breizhek. Embannet en deus, dindan an anv *Pipi Gonto*, e 1902 ha 1908, daou levr marvailhoù (...). Pennadoù niverus e komz-plaen ha barzhonegoù gantañ a zo bet embannet war *Kroaz ar Vretoned*, a voe renet gantañ end-eeun e-pad un nebeut bloavezhioù. Savet en deus abaoe ur gelaouenn all, *Arvorig*, a zo bet staget diwezhatoc'h ouzh *Feiz ha Breiz* hag, er fin, unanet gant ar gaze-tenn sizhuniek *Breiz* e 1927 (...).

Evit c'hoariva pobl Vreizh en deus Erwan ar Moal skrivet un niver a bezhioù-c'hoari, farsus peurvuiañ evel *Tog Jani*, *Paotr e vragoù berr*, *An hini gozh o vont da denañ he foltred*, *Job an Ti-all* (...). Hogen ar maout a chom gant drama *Ar Chiminaou* (...). Ur perzh mat-dreist, na gaver ket alies en teatr brezhonek, a zo d'ar pezh-mañ: n'eus ket ennañ a fistilherzh aner.

Erwan ar Moal a zo e-touesk gwellañ skrivagnerien e amzer ha, daoust d'e skridoù kaout liv rannyezh Treger a-grenn, morse n'hon eus kavet e oa kement-se awalc'h d'o lakaat diaes da lenn d'al lennerien a lec'h all.

Abeozen, Istor al Lennegezh Vrezhonek

MAZE A LAMPORECHO

Giovanni Boccaccio / Alan Brenn

Setu un drede gontadenn diwar-zorn Giovanni Boccaccio. Ar wech-mañ e tezevell ar marvailher italian tonkadenn Maze, ar c'houer a Lamporechio. Ne selaouas ket an den yaouank-se ali al liorzher kozh a-zivout al leanezed, sentiñ a reas ouzh e pret-dreist e voe e fiziañs.

« Kreñvoc'h an anienn eget pep kelennadur-*Den Yaouank hag ar Gwazi*, hon doa embannet «Selaou ouzh da galon hag e ri berzh» a zo, moarvat, a embannomp en dro-mañ. Aes eo meizout perak danevelloù Boccaccio.

Perzhioù mat all o doa e skridoù. Gwelit an Italian e istor gant nebeut a c'herioù hep na eus e vuhez. Ur skouer e oa evit skrivourien a danvez puilh ha fetis gant neud berr-linennoù, ha gant ur mestr bourrus.

Disheñvel ivez karantez Boccaccio diouzh hini ar barzh e vlev melen, Brizeug, a levezonas don astennerion gwerzennoù hon 19^{vet} kantved. Ur sell yac'h da daole ar marvailher war ar garantez, kigusc'h moarvat, met o chom war dachenn al lennegezh uhel. E dro-spered a glote adarre ouzh hini ar Walarniz. D'an hevelep mare e embanne Drezan *An Dour En-dro d'An Inizi*, hor romant karantez kentañ. Ha bez e vo, marteze, un hekleus eus istor Maze, en un istor-kouent all, embannet diwezhatoc'h kalz, *Sizhun Ar Breur Arturo*.



En hor bro ez eus ur gouent, a voe brudet gwec'hall en abeg d'he santelezh. N'eus ket gwall bell ne oa enni nemet eizh leanez, hag an abadez ouzhpenn. Ul liorzher kaer o doa, hag ul liorzher dispar.

Un deiz e tivizas al liorzher-se mont kuit, war zigarez ne oa ket uhel awalc'h ar gopr a c'houneze. Mont a reas da gaout merour al leanezed, hag e tistroas goude d'e vro c'henidik, d'ur vourc'h anvet Lamporechio.

Pa voe degouezhet eno e teuas an holl gouerien d'e welout, hag en o zouez ur c'hanfard yaouank, anvet Maze, un troc'had mat a baotr, kaer awalc'h evit un den izel. Goulenn a reas ouzh Nuto, -evel-se e oa anv al liorzher- pelec'h e oa bet e-pad keit amzer. Nuto a respontas e oa bet en ur gouent gant leanezed.

-Ha petra a roent deoc'h da ober? eme Vaze.
-Labourat ul liorzher vras ha kaer o deus. Degas dezho keuneud a yaen da droc'hañ er c'hoad, puñsañ dour, ha kalz labourioù all evel-se. Ken izel e oa va gopr, avat, ma c'hellen a-boan paeañ ar botoù a uzen. A zo gwashoc'h, ez eo al leanezed holl yaouank ha prim-meurbet. N'heller morse ober diouto. Darbet eo bet din kant gwech koll va fenn. Pep unan a felle dezhi gourc'hemenn. «Laka se amañ», eme unan, kerkent ha ma teuen el liorzher. «Nann, aze», eme eben. Un trede a gemere ar bigell diouzhin o lavarout: «N'eo ket evel-se». Ken hegaset e vezen ganto ma tilezen va labour alies ha ma'z aen er-maez eus al liorzher. Aet on skuizh gant kement a drabas. Paet fall e oan war ar marc'had. Divizet em eus o lezel. Prometet em eus d'o merour a-raok mont kuit e kasjen unan bennak dezho em lec'h. Hogen ur garg ken fall ez eo ma ne gredan ket hec'h erbediñ da zen ebet.

Pa glevas ar c'homzoù-mañ, e teuas c'hoant da Vaze mont d'en em ginnig d'al leanezed. Ne oa ket arc'hant a c'hoantae. Ur mennad all en doa, ha ne ziskrede ket nemeur e vije gouest d'e gas da benn. Birviñ a rae zoken gant ar c'hoant da vezañ eno. Kuzhat a reas e vennad, evelato, hag e lavaras da Nuto en doa graet mat o vont kuit.

-Ne echuer morse gant ar merc'hed, emezañ. Pe waz a c'helfe padout? Koulz eo bevañ gant diaouled ha bevañ gant leanezed. Ne ouzont ket petra a fell dezho ur wech war seizh.

A-vec'h aet diouzh ti e amezeg e klaskas Maze penaos seveniñ e vennozh. N'en doa ket aon rak al labour. Nerzhus awalc'h e oa evit-se. Evit ar gopr,

-38-

ne rae netra dezhañ bezañ paet mat pe fall. Ne c'het e oa hepken o soñjal e vije nac'het e gemer marteze en abeg d'e yaouankiz. Strafulhet e oa gant se. War-bouez prederiañ, avat, e kavas ur strobinell. Ar gouent, emezañ ennañ e-unan, a zo pell ac'han. N'on anavezet gant nikun. Drevezañ a rin ar mud. Degemeret e vin sur ma ouzon en em zibab.

Hag en da lakaat ur bigell hag ur vourc'h war e skoaz ha da gemer penn e hent war-du ar gouent.

Dont a ra er porzh. Eno e tegouezh gant ar merour. Mont a ra d'e gaout. E bediñ a ra, dre orbidoù, da rein dezhañ da zebriñ en anv Doue, en ur ober dezhañ intent e oa prest da labourat, faoutañ keuneud pe n'eus forzh petra. Ar merour a roas dezhañ da zebriñ, ha neuze, da welout petra e oa gouest da ober, e tiskouezas dezhañ skodoù tev ne oa ket bet Nuto evit o faoutañ. Dont a reas Maze a-benn anezho hep dale. Ar merour, plijet-meurbet gant e nerzh hag e ampartiz, a gasas anezhañ betek ar c'hoad da droc'hañ keuneud. Gourc'hemenn a reas dezhañ e sammañ war un azen en doa kaset gantañ, ha bleñiañ al loen betek an ti. Sentiñ a reas Maze gant aked.

Ken laouen e voe ar merour o welout pegen speredek e oa ar paotr, ma viras anezhañ evit labourat e-pad un devezh bennak. An abadez, o tremen ur wech dre eno, a c'houlennas piv oa.

-Ur paour kaezh, eme ar merour, bouzar ha mut, hag a zo deut en deiz all da c'houlenn an aluzen. Lakaet em eus anezhañ da labourat evit an ti, ha mat en deus labourat. Ma oar arat ha gounit douar, ha ma kar chom, e c'hellfec'h e virout evel liorzher. Barrek eo da rentañ servij: yac'h eo, kreñv, ha bolontez vat en deus. Ober a rafe kement a c'hourc'hemennfemp dezhañ. Hag ouzhpenn, n'ho pefe ket da gaout aon e komzfe ouzh al leanezed.

-Sed aze, eme an abadez, un ali fur-meurbet. Gwelit ha gouzout a ra gounit an douar, ha klaskit e virout. Roit dezhañ da zebriñ kement ha ma karo, evit doñvaat anezhañ en doare ma chomo.

-Ober a rin evel ma lavarit, itron. Va gwellañ a rin da sentiñ ouzhoc'h.

Edo Maze nepell diouto oc'h ober van da skubañ ar porzh. Klevout a reas fraezh an amzviz-se. Leun a eürusted, e lavare dezhañ e-unan:

-Ma virit ac'hanon, itronezed, arat a rin ho liorzher ken mat ha ne vo bet gwelloc'h aret bis-koazh.

“E zebrin a rae an div bolezig gant o selloù”

Kaset e voe d'al liorzher gant ar merour. Eno e labouras gant kement a ampartiz hag a-raok. Ma c'houlennas ar merour digantañ ha karout a raje chom er gouent. Respont a reas, dre orbidoù, e raje kement a blijfe d'al leanezed. Gopret e voe raktal. Diskouezet e voe dezhañ pezh en dije da ober. Neuze ez eas ar merour kuit.

An holl leanezed a glevas kelou dizale eus donedigezh al liorzher nevez. Mont a raent alies d'e welout o labourat, ha plijadur o deveze o kantañ dezhañ sorc'hennoù a bep seurt, evel ma reer a-wechoù d'ar vuded. Ne oant ket nemeur war o evezh. Pell edont diouzh kreñn e c'hellje al liorzher o c'hlevout. An abadez, o verzout e oa un den dinoaz, dre an teod pe a-hend-all, a oa dinec'h-kaer. Ken mat en doa c'hoariet Maze ma tremene evit un diskiant dirak an holl leanezed. Ne c'hortoze nemet kaout tro da zidouellañ darn anezho.

N'en doe ket da c'hortoz pell. Un deiz m'en doa labourat kalz, ec'h en em astennas war ar c'hla-zenn da ziskuizhañ. Edo div leanez yaouank o pourmen. O tont dirazañ, chom a rejont a-sav da sellout outañ. O spurmantañ a reas. Hogen ne reas van.

E zebrin a rae an div bolezig gant o selloù.
-Ma vefen sur, eme an divergontañ anezho, e oufes d'erc'hel da deod, e lavaren dit ur mennozh a zo deut din alies, hag a vefe ken talvoudus dit ha din-me.

-N'ec'h eus ket aon da gaout. Prometiñ a ran dit tevel.

-Ne ouzon ket, a gendalc'has ar plac'h divezh, ha soñjet ec'h eus a-wechoù pegement e vez dal-c'het warnomp en ti-mañ. Paotr ebet ne c'hell dont e-barzh, nemet hor merour kozh hag an hini mut-mañ. Klevet em eus digant itronezed a zo deut d'hor gwelout ne oa holl blijadurezhioù an douar netra e-skoaz ar blijadur he deus ur vaouez gant ur gwaz. Soñjet em eus meur a wech e c'hellfemp klask gouzout ha gwir eo gant ar mud-mañ, dre ziouer a netra gwelloc'h. Bez' ez eo dres an hini a

zere ouzhip. Ha pa nac'hfe, petra 'vern? Divarrek eo da flatrañ. Yaouank-flamm eo, stummet-mat, hag e hañval bezañ nerzhus a-walc'h evidomp hondi. Ne fell ket dit ober un arnodenn?

-Siwazh, petra 'lavarit, va c'hoar? a grias eben. Soñjit hon eus gouestlet mirout hor gwerc'h-ted!

-Nag a ouestloù all a reer bemdez, a cilgerias ar gantañ, hep d'erc'hel da unan anezho?

-Gwir eo, va c'hoar. Hogen, ma vefemp bra-zezet?

-Arabat en em chalañ gant gwalleurioù da zont! Ma c'hoarvezfe dimp kement-se, ober a rafemp en doare d'hen kuzhat, sur-awalc'h.

War se ne gavas mui he c'heneilez etra da respont. Birviñ a rae, daoust d'he spont, ken c'hoantus e oa da armodiñ peseurt loen eo ur gwaz. Goulenn a reas hepken:

-Ha penaos ober da virout na vefemp gwelket gant den?

-Bez dinec'h, eme ar gantañ. Kreisteiz eo. Hep mar ebet emañ an holl c'hoarezed oc'h ober kousk-ae. Kouskoude, evit bezañ asur, greomp tro al liorzher da welout hag ez eus unan bennak. Neuze



-39-

e c'hellimp kemer hemañ dre e zorn, ha kas anezhañ d'al lab a dalv dezhañ d'en em lakaat en disglav. Tra ma vo unan ac'hanomp gantañ e-barzh, e chomo eben da ziwall er-maez. Ken sot eo ma raio pezh a garimp. Me a zesko dezhañ ma n'eo ket bet desket c'hoazh.

Klevout a rae Maze ar gaozeadenn skouerius-mañ. Santout a rae ar c'hoanto o sevel en e galon. Redet awalc'h e vije betek al lab araozo. Gant aon da goll e breizh, avat, e lezas anezhañ da ober, hag e c'hortozas ma teujent d'e gemer dre e zorn.

An div leanez a reas tro al liorz. O vezañ ne oa nikun dre eno, na nikun a c'helle o gwelout, e teujent en-dro davet al liorzher. An hini he doa komzet ar gentañ a dosta hag a zihun anezhañ. Sevel a ra Maze. Al leanez a grog en e zorn, hag en ur ober allazig dezhañ, e kas anezhañ betek al lab. Mont a ra Maze war he lec'h en ur c'hoarzhin evel un inosant. Eno, hep klask digareziou, e tic'hoantas an dimezell. Fin-awalc'h e voe da veniañ he diampartiz, hep en em werzhañ koulskoude. Al leanez, eürus-bras, a yeas er-maez da lezel he mignonez da vont en he lec'h. Ken akuit e voe Maze gant an eil ha gant eben. Hag evel na vezer ket lent dirak an diskianted, e fel-las dezho o-div, a-raok kuitaat al liorzher mut, gouzout hag ur marc'heger mat e oa. Gwalc'het e voent o-div.

Diwar neuze ne rejont mui nemet komz eus ar blijadur a dañvaer etre divrec'h ur gwaz. Kant gwech brasoc'h e oa ar blijadur-se, emezo, eget n'o dije kredet. Me ho lez da soñjal pegen alies e tistrojont d'al lab goude-se. Gouzout a rejont dibab ar mare gwellañ da vont da c'hoari gant ar mud madelezhus.

Un deiz, avat, e voent gwelet gant unan eus o c'heneilezed, o fringal gantañ hag o vont e-barzh al lab. Houmañ a lavaras se raktal da ziv leanez all a oa ganti en he c'hamb. C'hoant o devoe da gentañ, douget gant ar warizi, da flatrañ d'an abadez. Hogen distreiñ a rejont diwar o mennozh. Kaozeal a rejont gant an div bec'herez. En em glevout a rejont da rannañ etrezo ar pec'hed. Hag evel ar re gentañ, ser-vijet-mat e voent gant Maze.

BOCCACCIO WAR AL LANV

«An Den Yaouank hag ar Gwazi»
niv.44
«Kern Evit Kern»
niv.45

Ne chome nemet teier leanez hep kaout o lod eus ar wastell. Gant an amzer e teujont da greskiñ bagad ar mud. Pebezh divorfiler leanezed, emezoc'h! Gortozit, ne oa ket echu e droioù!

Ne ouie an abadez netra eus ar pezh a c'hoarveze. Seul aesoc'h e oa d'ar polezi bihan a oa din-dan he divaskell kuzhat outi o darempredoù gant ar c'hilhog-liorzher ma edont holl a-gevret, an eil ken kablus hag eben.

Un deiz e oa tomm-grizias. Edo an abadez o vale hec'h-unan dre al liorz. Kavout a reas Maze kousket e skeud un alamandezen. Labourer trawalc'h en doa e-pad an noz evit kaout ar gwir da ziskuizhañ e-pad an deiz. Edo darn eus sultanezed e harem gant ar c'hleñvedig a ouzoc'h, haasket en doa ar re all.

En e roched e oa, en abeg d'ar wrez. Savet e oa bet e roched gant an avel ken uhel ma oa dizolo eus e zivrezhet betek e stomok. Ouzh e welout evel-se, emañ broudet an abadez gant flemm ar c'hig. Trec'het eo evel ma oa bet he leanezed. Selout a ra tro-war-dro. Ne wel na ne glev nikun. Dihunañ a ra Maze. E gas a ra d'he c'hambrou. Pebezh levezeg evit! E virout a reas ganti meur a zevezh, daoust ma save klemmoù bras gant al



leanezed, pa ne zeue ket ar c'houer da labourat o liorz. Ober a reas dezhañ debrin, evañ ha poaniañ kalet. Ne lezas anezhañ da vont en diwez nemet gant ar soñj d'e c'hervel en-dro dizale.

Karout a rae ar c'hoari. Digreskiñ a reas evel-se lodenn ar re all. Rak, evitañ da vezañ nerzhus, ne oa ket evit o gwalc'hañ holl. Meizañ a reas zoken, ma kendalc'hije gant ar vuhez-se, e kouezhije buan klañv.

Un nozvezh eta ma edo kousket gant an abadez, ha ma c'houlenne houmañ digantañ muioc'h eget na c'helle reiñ dezhi, setu ma lavaras en un taol:

- Itron, gouzout a ran e c'hell ur c'hilhog bezañ a-walc'h evit dek yar. Hogen diaes eo da zek gwaz dic'hoantañ ur vaouez. Penaos e rafen-me eta, p'em eus da bleustrin war nav? N'on ket evit padout, itron. Reizhit kement-se, m'ho ped, pe lavarit din mont kuit.

Darbet e voe d'an abadez semplañ gant ar saouzan.

- Na petra'ta! emezi. Me a gave din e oas mut.
- Mut e oan e gwirionez, eme Vaze, nann avat dre c'haneidigezh, hogen da heul ur c'hleñved a reas din koll ar vouezh. Emaon o paouez adkavout anezhi, Doue ra vo meulet!

An abadez a gredas pe a reas van da grediñ pezh a lavare. Goulenn a reas outañ piv oa an nav maouez en doa da baskañ. Maze a zisplegas dezhi kement a oa c'hoarvezet.

An abadez, o welout ne oa ket he leanezed furoc'h egeti, hag o tamgrediñ e ouient, int ivez, un dra bennak eus he darempredoù gant Maze, pe ne zalejont ket da c'houzout, a reas he mennozh en em glevout ganto da virout al liorzher mat-se hep ober brud. O gervel a reas. Anzav a rejont holl outi ar pezh na oant ken evit kuzhat. Bez' e voe an abadez ar gentañ da c'hoarzhin. A-unvouezh e tivizjont e vije kontet d'an amezeien ha d'an dud a zeue d'o chapel en doa Maze adkavet e vouezh, dre harp o fedennoù ha dre hanterezh sant-paeron ar gouent.

Marv e oa ar merour abaoe ur mare. Lakaet e voe Maze en e lec'h. Kousket a rejont gantañ, pep hini d'he zro. Prometin a rejont, avat, armerzhañ e nerzh, evit e virout pelloc'h. Maze a reas e vicher eus e wellañ. Meur a gurust bihan a voe ganet. Hogen ken kuzh e voe dalc'het kement-se ma ne stagas ar brud da redek nemet pell amzer goude marv an abadez, ha goude m'en doe Maze, erru kozh, graet e soñj distrein d'ar gêr karget a vadou.

Kalz a drouz a reas an istor-mañ. Ne veze komzet nemet eus al liorzher aet da vondian, en doa tremenet e yaouankiz en un doare plijus-meurbet, hag a oa deut pinvidik er-maez eus an ti goude bezañ aet e-barzh hogos en noazh.

Evel-se e vez digollet gant an neñv ar re a indoun hag a zour liorzh disec'het al leanezed kaezh.

BOCCACCIO
(tr. Alan Brenn)

EUSKADI (kendalc'h ar bajenn 11)



JUAN JOSE EXTABE

E fin ar bloavezhioù 50 emañ Franco e penn Bro-Spagn, straedoù a zoug anv «Adolf Hitler», ospitalioù a zo badezet gant hini «Mussolini».

Ezel eo Juan Jose Extabe eus ur strollad politikel anvet ETA. Bac'het eo bet dija en abeg d'ar perzhadur-se, —ha dieubet e-drugareg da varv YannXXIII.

E 1962 e c'houlennet digantañ sevel rann-arme an ETA. Kemer a ra perzh en taolioù-nerzh kentañ, den n'eo lazhet.

War-dro 1968 e tec'h da Hanternoz Euskadi, war zouarout ar Stad c'hall. Kuitaat en deus rann-arme an ETA, digeriñ a ra un ostaleri e Donibane-Loitzun.

Pemp gwech, etre 1968 ha 1979, e klasko ar c'hallaoued skarzhañ anezhañ; pemp gwech e ray harz-debriñ, hag e vo anavezet e wirioù e-pad ur pennadig amzer. Sur-mat e tisplije da veur a hini ar c'homzoù en doa bet distaget d'ur prefed: «Ho pet soñj ez on un Euskarad hag emaoimp e Euskadi, ma'z eus un estranjour amañ, n'eo ket me an hini eo.»

Gwashoc'h a c'hoarvez. E 1978 emañ taget gant Polis Kuzh Bro-Spagn. E wrez a zo lazhet, en a zo savetet e vuhez, daoust d'ar 17 boled en deus paket.

Un tabud etre truede eo, hervez Polis Bro-C'hall, un houlier eo Juan-Jose Extabe... ETA a dalvez kement ha Mafia. Ur bloavezh war-lerc'h, amzer da Extabe adkavout e yecl'hed ha dougen kañv d'e wrez, e kinnig ar mererezh skarzhañ ar stourmer adarre, evit ma c'hellfe ar Spagnoloù peurgempenn o labour.

Kelou a vez kaset da Extabe 3 devezh en a-raok (8 devezh a ranke bezañ hervez al lezenn), nac'het eo outañ e aotre-kenwerzh. War yun ez a adarre, dezhañ da vont ma-net dinezhi abaoe an dagadenn, hag e ziv vrezh; 14 vloaz eo Izar, ha 12 Anaiz. Sevel a reer ur C'huzul Skoazell, emañ kenwerzhourien eus Donibane-Loitzun.


Goude ur 15 deiz bennak ez a an trec'h, ur wech c'hoazh, gant Extabe.

Planedenn Juan-Jose Extabe a zo bet hini meur a repudabaoc'e ur c'hard-kantved. Kemm a ra renerien e penn ar Stadoù, an eskemm-servioù a zalc'h da vont endro.

1973 — CARRERO BLANCO

E miz Kerzu 1973 e voe lazhet gant ETA an Admiral Carrero Blanco, a ranke kemet penn Bro-Spagn da heul Franco. En abeg da varv hemañ eo e adkavas Bro-Spagn an demokratelezh, goude marv Franco, e 1975.

Mari Gloaheg Mamm Bleimor youenn drezen



Fromet ez eo bet ar Vrezhoneg gant ke-
lou marv, d'he 85 vloaz, d'ar gwener, lan a viz E-
brel, mamm Y.B. Kalloc'h, ar barzh Bleimor.

N'eo ket moarvat, peogwir eo aet mamm
skrivagner **Ar en Deulin** da anaon en ospital ar re
gozh e Porzh-Loeiz, nepell diouzh an Oriant. Bihan
eo ar wennen a vez dastumet gant ar varzhed di-
war o oberoù. N'oa ket bet pinvidikaet ar vaouez
gac'h gant brud he mab, na, kennebeut, gant e va-
ry, d'e 28 vloaz, «evit ar Frañs»; ouzhpenn ma oa,
siwazh dezhi, intañvez-abred ur martolod. Unan e-
toubez bernou ha bernou re-all.

Ar vaouez kozh-mañ, avat, aet ker di-
drouzik d'ar bed all, a oa mamm ar barzh a zo bet
luskellet, entanet ha maget hor speredoù gant e
skridoù, goude ar brezel, pa n'oa, en-dro deomp,
nemet ur gouelec'h kras diouzh tachenn ar brezhoneg.
Ha d'ar vamm-se n'hon eus ket marc'hatet un
ivnad eus hon doujans, biskoazh.

Marteze e vo roet din aotre, gant lenne-
rien Stur da enoriñ evito, amañ, e nebeut linne-
noù, ar wech nemeti m'omp em gavet kevret.
Ra vo al linennoù-se ar gurunenn a lakaan war vez
ar Vrezhoneg, glac'haret a-hed he buhez, hogen
hael, a zo bet evit ar wech, eus mamm ar barzh
Bleimor, ha lavaromp d'heul he-mañ:

*Huñh ar er ré-varu-men astennet èl lann vras,
Déhé holl er vuhé e zaskori...*

pe:
«C'hwec'h war ar re varv-mañ, astennet el lann vras,
«Dezho holl ar vuhez a zaskori.»

Rak, daoust din, evel kement a vrezho-

negerien all, bevañ diouzhin va-unan, bet on per-
c'hirin, ur wech, war vez Bleimor, en Enez Groe,
hag e ti e vamm.

An dra-mañ a voe d'an 29 a Wengolo
1925.

Diwar an notennouigoù a c'hellan lenn
c'hoazh war un tamm karnedig, — n'am boa ket ne-
meur a urzh em skridennoù d'ar mareoù-se, — e wel-
lan e oan aet, kerkeret ha dilestret diouzh bag-treizh
an Oriant, da stouñ war vez ar C'halloc'h bras.
Eveshaet em boa e oa ar groaz, —keltiek he stumm
ha kizellet gant Le Quéré, Pont-Aven, — 2,50 m pe
3 vetr sav dezhi, ha kaer kenañ gant an tresoù ga-
ranet er maen. Lennet am boa ar skridenn:

Bé saüet Get Donezoneu.

lehann-Per Kalloh

Leshanüet «Bleimor».

Gañnet è Groé, 24 a hourlélen 1888

Marvet ofisour, er Brezél Bras

Etal Urvillers, 10 a Imbril 1917.

Skriüet en dés ur hañr a livr

«Ar en Deulin».

Breizhiz, pedet aveiton.

Bleuniet brav e oa ar bez, hervez va no-
tennoù, ragachat a rae filiped, a vil-vern, er vered
hag en-dro da voger ar vered. Klevet e voe un taolig
kloc'h. Gwelout a raen ar mor, ouzh tu an douar
bras, gant ur vag-lien, pell. Ha neuze, mouezhiou
bugale er vourc'h, hag an noz o tont.

Goude bezañ pedet war vez ar mab, ne vi-
jen ket aet kuit diouzh enez Groe, a-dra-sur, hep
mont da saludiñ ar vamm. N'oa ket diaes mont da
Gerklavizig, he chomlec'h. Anavezet e oa gant an
holl mamm ar «Bleimor»; ouzhpenn ma oa an ti
aes da gavout, e-unan a-hont, gwenn-kann, war al

«lann vras», nepell diouzh ar maen-hir, hini Salver-
ar-Bed.

Ne vo souezhet den ganin pa lavarín e voe
græet din degemer ouzhpenn eget dereat: kalonek.
Ganin, a-dra-sur, e teue brezhoneg mat, hini ar vro
vigoudenn. Mamm Y.B. Kalloc'h a gomze brezhoneg
hec'h enez ouzh doare Bro-Wened. Nag an eil
nag eben, n'oamp ket barrek d'an ampoent da la-
kaat hon doareoù distagañ da glotañ. Hep dale pell
e stagas an eil hag egile gant ar galleg, ha kaoz en-
dro ganeomp hon-daou diwar-benn ar mab lazhet
er brezel hag ar barzh dispar anavezet ganin e levr
linenn-dre-linenn.

Ma voe ankounac'haet gant ar weladenner
a oa ac'hanon, an eur, evel just, ha va menno peñ-
an intañvez gozh da zont da zibriñ er vourc'h. Rak
mar deo gwir n'on ket bet dalc'het morse war va
c'haoz, mamm ar barzh «Bleimor» a 'z ae he zeod
en-dro ivez. Hi, avat, n'oa ket bet ankounac'haet
gant he «dever ostizez», evel ma lavar ar C'halla-
oued. A-barzh zoken m'am boa taolet evezh, e oa
bet lazaet dirazon war an daol, ur pezh alumenn-
vioù, ha gwin, peadra terrin sec'hed n'oar den pet
martolod.

Dre douez, ivez, e tigre tiretennoù, hag
e lakae din war an daol, da sellout pizh outo, —
hag e raen, — enivrennoù ha relegennoù he mab.
Gwelout a ris, aet da vergl, ar chadenn-arzorn a oa
engravet war ar plak anezhi, anv «J.P. Calloc'h
1908», hag ur vedalem a Santez Anna Wened, ha
forzh luc'hskeudennoù.

Hervez a gredan e oan deut mat kenañ da
vamm Kalloc'h, rak kinnig a rae din dibab ha kas
ganin kement tra a blije din eus ar pezh a oa cho-
met war-lerc'h he mab. Ma vije bet c'hoarvezet an
dra bremañ, ne lavaran ket am bije nac'het ar pro-
foù prizius-se. D'an ampoent avat, —25 vloaz e oan,
— dianav, paour, ne gredis ket, ha ne fellas ket din
touellañ fizians ar vaouez gaer-se. Ouzhpenn eget
nac'h kemer tra, ali start a ris dezhi chom hep kin-
nig mui d'an estren enivrennoù he mab.

Ret e voe din koulskoude kas ganin, e
koun, trajedienn Job ar Bayon: Nikolazig, e brezh-
honeg Gwened, gant ur skridenn verr, diwar zorn
«Bleimor» e liv ruz: «J.P. Calloc'h, Lorient, août
1909».

Meneget e voe darempredoù hag anaoude-
gezhioù ar barzh, rak anaout a raen meur a unan.
Kaoz a voe ivez eus planedenn drist meurbet an ti-
gezh: an tad, martolod, flastret er Groazig, war am
eus soñj ervat, etre e vag ha mein ar c'hae; ar mer-
c'hed deut da vaouezed yaouank ha drastet gant ur
c'hleñved divalav; unan eus ar baotred simplik e
benn, siwazh, hag egile, an hini brudetañ, kouezhet
er brezel.

A-dra-sur, e veizen, par welloc'h, ma
c'helled, perak e oa ker trist holl varzhonegoù ar
barzh «Bleimor», trist-kañvaouüs, daoust d'e feiz

'tomm-meurbet ha d'e nebeut a oad, d'e yaouankiz,
mammenn levnevez dinec'h, peurliesañ.

Hag e lavare din mamm Kalloc'h, rak,
pep eil tro, e teue brezhoneg ganeomp:
«Er peur keh kroedur, ya! skriüet en des
treu brau, sur!»

Ur mare all bennak, e kanas, evel eviti
hec'h-unan, penmadou eus ar son «Jesus-Kroedur».
Hen anavezout a rae penn-da-benn.

N'oufen ket lavarout piv a droc'has ar
gaoz da gentañ. Diwezhat e oa atav. Ret-mat e voe
aozañ din ur gwele; ha me er-maez da avelin va
fenn. Sjioul-meurbet e oa an noz, hep ur pikad avel,
hep an disterañ trouc. Luc'hañ a rae peder gwech,
heul-da-heul, tour-tan ar Penn-Maen.

Petra 'lavarin muioc'h? Ar gwele a voen
lakaet da gousket e-barzh, a oa eeun-hag-eeun hini
ar barzh Bleimor. Ouzh speurenn wenn-razet tal ar
gwele e oa istribilhet ul luc'hskeudenn dioutañ
brasaet, ha lakaet dindan ur stern-goad. Evit ar
peurrest, n'oufen ket lavarout ez-reizh penaos e oa
annezet ar gambr, rak moan eo ma notennoù.

Un dra, avat, a zo chomet resis em spe-
red: va esmae, pa voe ret din em lakaet e gwele
ar barzh hael. Hag un dra all: ar fizians karantezus a
voe diskouezet diouzhtu gant mamm Y.B. Kalloc'h
d'ar paotr yaouank dianav ha paour, a oa deut un
abardavezh a Wengolo, d'he saludiñ, en abeg d'he
mab, skriver Ar en Deulin.

Ra vo flour, kichen he mab brudet, he
fried hag bugale all, kousk diwechañ, e bered Enez
Groe, Mari Gloaheg, maouez Y.B. Kalloc'h!

Youenn DREZEN

Embannet e oa bet ar pennad a-us e 1938, er bloavezh ma
vrasas Mari Gloaheg, un hañter-ganivet war-lerc'h ganidigezh he mab,
Yann-Ber Kalloc'h.

Un testi eo a-zivout Bleimor, ha seul priziusoc'h m'eo
hini ur barzh, hini ur brezhoneger, hini un den a-oad gant anez. *Ar en
Deulin*. Un testi eo ivez a-zivout hañter-krivagner Youenn Drezen, e
lennadurioù, e droioù dre Vreizh, e notennoù.

Savet eo bet ar pennad diwar notennoù 1925. Pidal a ka-
ver ennañ tennoù a vo re Youenn Drezen eus *Mintin Gist* betek *Skol
Louarn Vek Trebern*: ar vamm, intañvez a-bred, — evel mamm Drezen
hag hini Paol Tiril, — ha, dreist-holl, an «enezen», al «lec'h-koz e-kreiz
an e-chouder». Enez Groe e-kreiz ar mor, ar vered e-kreiz ar vuhez, li
Gerklavizig e-kreiz al «lann vras», ar gwele e-kreiz an ti, an esmae-
kreiz an den... Un doare remake eus *An Douar en-dro d'un Inizi*, gwi-
rionoc'h marteze.

Anv gwir ar pennad a oa «War vez Mari-Gloaheg, Mamm
ar Barzh Bleimor». Embannet e voe war *Stur* niv. 14-15, 1938. Perak
e kenlabourte un «anarkour» evel Drezen gant faskourien *Stur*? Edo
moarvat, o klask an «nerzh»-se a rae diouer dezhañ ha, evel ma ou-
zer, d'e skridoù. En e galon edo e gwirionez, met penaos en dije bet
Youenn Drezen fizians ennañ e-unan pa ne gave lennet obei a-
gantañ war talvoudgezh perzhioù gwellañ e obereñnoù. Un den e-
nan-penn eo bet goude marv Jakez Riou, — ha setu perak e reas ken-
net evit dere'he! beo koun e gened.

Ul lamm diwar-c'horre eo a stage Drezen ouzh paotred
Stur. Ne gredan ket, da skouer, o dije Mordrel pe Lainé anavezet ken
didro o esmae da gousket e gwele ur barzh meur. An «esmae»-se
koulskoude, ha fizians Mari Gloaheg, eo a zo meizadurioù persone-
lah Drezen, deuet int war-c'horre hep skoazel an «notennoù».

Ar pennad a hañval bezañ bet savet war ar prim gant un
den a-vecher avat! N'am eus kenmet nemet un dra: Ar c'hiz a oa neuze
ober gant gour kentañ e liester («ni», «deomp...») e-lerc'h gour kentañ
an unander («me», «din», «am eus...»). Lakaet em eus-me gour an
unander. N'eo ket «kiantel» an embannadur eta, met bourrañ eo,
ha naturelloc'h, a-gal.

Paskal ar MARC'HEG

Roman de Baïbars, Sindbad,

1985-?



Gwall dreut ar peuriñ ganeomp alies, ken e teu c'hoant gant unan mont war melchon ar re all, drusc'h-mat alies ivez. Pe, d'en lavarout en un doare all, oc'h adkemer komzou Rabinathan Tagore — dre vras : ret digeriñ ledan prenester ha doriou an ti da'r seizh avel bep ar mare, da skarzhañ c'hwaz ar c'hozh hag al loued, hep bezañ bout, koulskoude, diskaret gante...

Ar gevred e c'hwazho an avel hiziv, paket ganti war he hent ur frond all, hini hon amezeien dostañ.

Tri bloaz zo e krogas an ti-embann Sindbad da voulañ *Le Roman de Baïbars*. Dezevell a ra istor Baïbars, ur mamlouk a zeuas da vezañ sultan en trizekvet kantved, o ren war broioù Damas ha Kaero. Ul lod eus lennegezh-pobl ar reter-nesañ ez eo, bet tremenet a remziad da remziad gant konterion a vicher, ar re-mañ, evel just, o kemm mui-pe-vui an istor hag oc'h ouzhpennañ pe o tilemel traou. Meur a zornskrid zo ivez hag an embannadur-se zo bet savet diwar an hini gwellañ, diouz soñj an droerion, un dornskrid eus hanterenn gentañ ar c'hantved diwezhañ.

Heuliañ a ra (a ray) an danevell istor Baïbars, eus e oad tenerañ betek e varv, o tiskouez penaos e teu e vuhez da glotañ gant an tonkadur bet merket dezhañ. Pennadoù berr a-walc'h, diliamm kenetreze alies-mat, a laka war-wel an holl skoilhoù a gav war e hent hag an holl guriou a vez sevenet gantañ da dremen dreist dezhe. Skozzellet e vez gant ur seurt palafignig anvet Otmân, un den gwall iskis anezhañ, leun a widre hag a gorvigell, laer ken ez eo, hag a ve tu da grediñ ez eo troet e benn da vat gantañ. Hogen, daoust d'e droioù-kamm hag amoret, ne ra nemet kas Baïbars pelloc'h war hent e donkadur, dibalamour a-walc'h ouzhpenn dre ma oar ez eo bet termenet d'e vestr bezañ sultan. Ha n'hell ken an nen stourm a-enep d'e blanedenn, anañ.

Rak ouzhpenn bout diazezet war un istor gwir, ouzhpenn taolenniñ kevredigezh ar mare, e ro deomp un alberz eus kredennoù zo, evel hini ar "Qutb". Hemañ a c'hellfed da dermeniñ evel ar Roue Meur, rener ar bed, o vevañ en un eil bed, trabedoniell, kenstur gant hon hini. Daou-ugent fur a zo en-dro dezhañ, "mevelion Doue/Allah". Liammet int gant ar bed-mañ ivez ha

tremen a c'hellont eus "Bed ar C'hevren" d'hon hini evel a garont. Gouzout a reont kement zo bet, kement a c'hoarvez ha kement a vo hag en reñf a reont da c'houzout ivez a-wezhioù da vBaïbars, dre hanterouriezh Otmân da skouer. Daoust da se e vez dal'c'hmat al lenner war e api, aon gantañ ne zeufe darvoudoù grevus betek-re da reñf lamm d'ar penn-tudennou. Gouezet o deus ar gonterion lakaat buhez e froud herrus an istor, o lec'hiañ o danevell a-bep-eil e palezioù ar vrientinion hag e bannlevioù ar partabl, oc'h ober alies gant ar yezh pemdeziek, luc'hach, trefodach hag all... Ur-seurt mojenn-pobl eo a-benn ar fin, leun a gann hag a c'hoarzh, ma veze enket ar selouerion — ha ma vez tapet al lennerion — etre enebourion Baïbars (Aïbak, Salâh El-Din, Jaouane...) hag e "skoazellerion" (Otmân, ar roue El-Sâleh, Châhin...).

Diaes d'al lenner padout gant ar c'hoant gouzout muioc'h, gant ar c'hoant mont pelloc'h gant ar benn-oberenn-mañ. Gwall diaes, evit gwir, gortoz al levrennoù da zont...! Peder anezhe zo bet embannet dia (130 pe 150 lur pep levrenn siwaz, war-dro 300 pajenn e pep hini):

1. *Les enfances de Baïbars*
2. *Fleur de truands*
3. *Les bas-fonds du Caire*
4. *La cheuachée des fils d'Ismail.*

Ar bempvet levrenn (*La trahison des Émiris*) zo sañset dont er-maez a-benn nebeut.

Ha sed ar c'helou mat, din da nebeutañ — rak seul hiroc'h an istor, seul vui a blijadur ganin —: un tri-ugent levrenn bennak a vo, unan pe zaou ar bloaz. Boz ha buhez hir d'al lennerion!!!



ALAN BOTREL ■

AL IANI

N'EUS FORZH PETRA!

Nouspet levr a zo bet gouestlet da tu dehou an Eil Emsav. — hoal an Diaoul Lostek na petra! Dedennus e vefe, bremañ, sevel istor an holl sokialourien-se, aezlegoù direizh, o deus bet tarni-jet tro-dro d'am Emsav, hep gouzout re vat, peurliesañ, hag e oa ar Baradoz, an Ifern pe ar Purgator, —ken mesket eo en Emsav, evel ma ouzoc'h, trouz dudius an telennoù boull ha c'hwazh flacius-dreits an dev.

E-mesk an aezez-se, hag a vez bepred en entremar war o doare-staotin (en o sav pe en o c'hluh?), emañ Yves Le Febvre, rener *La Pensée Bretonne*.

E 1918 e embannas war e gazetenn troidigezh ur pennad a oa bet embannet kent war *Kroaz ar Vretoned*. Ekreiz ar pennad e oa un hir a-garezenn wenn, skrivet warni: «(censuré)». War an niverenn war-lerc'h eus *La Pensée Bretonne*, ez embannas paotr ar Frankiz an notenn-mañ: «On a pu remarquer que la censure avait coupé toute la fin du texte de M. F. Vallée que nous voulions reproduire pour bien établir la position adoptée par certains «bretonnants» vis-à-vis de l'Irlande et des Sinn-Feiners. En coupant cet article où M. F. Val-

o tont ingal bep miz

bremañ

kazetenn
ar stourmoù
e Breizh

koumanant-bloaz : 120 lur

8 ru Hoche
35000 Roazon

La sentinelle LE GOPP au coup de mine du « Bois Français ».

Pendant que les hommes en ligne faisaient sur les Allemands un feu si efficace que l'ennemi ne put sortir de ses tranchées malgré ses cris répétés de « *Worwaerts!* » (En avant!), une escouade de la 2^e compagnie pénétrait dans l'entonnoir, qu'une patrouille prétendait à tort être occupé par l'ennemi.

En se rendant sur le lieu de l'explosion, le sergent Boulanger, de la 2^e compagnie, trouva un de ses guetteurs — le seul qui fût encore debout — au milieu des cadavres et des débris de toute nature. Comme il le félicitait d'être resté bravement à son poste, la sentinelle, qui s'appelait Le Goff-Gwenole, lui répondit en breton, car il ne parlait que cette langue : « Puisque vous m'avez dit, sergent, de ne pas bouger avant que vous ne veniez vous-même me chercher. »

Monographie Sommaire du 410^e R.I. pendant la Guerre 1914-1918
Paris, 1920

Les ethnologues

Le Monde 9.12.37

Les Français de Plözévet,
les Sioux du Sud-Dakota,
les Téké Tsavi du Congo, même combat.

lée «sanctifiait» des hommes comme Sir Plunkett impliqués dans une affaire de trahison, la censure bretonne a souligné la gravité de certains écrits bretons que la censure brioichine a sans doute eu le tort de tolérer.»

Pensée Bretonne, 15-08-1918

Pe C'hall pe Vreizhad e ve, ur sokialour o lipat heuzoù ar sizhaihouriou a zo un dra heugus. Blaz ar re nebeut a gavas Le Febvre gant ar geusteurenn, ha lakaat a reas, tra ma tivere an dour eus e veg vil, an darvoud da c'hoarvezout un eil gwech... Un eil notenn en doe tro da embann:

«La censure nous traite avec une faveur un peu trop marquée. Alors que nos «activistes» bretonnants peuvent écrire et diffuser toutes les sottises qu'il leur convient, la censure nous coupe chaque mois nos effets les plus sûrs. Si nous ne savions toute la difficulté de la tâche assumée par la censure bretonne et si nous n'avions pour nos censeurs beaucoup d'amitié et d'indulgence, nous finirions par trouver ce procédé désagréable.»

(Pensée Bretonne, 15-04-1919)

Pardonet e vo kalz da Yves Le Febvre rak komz a rae eus an Demokratelezh gant tan ha, dreist-holl, hep gwad:

«La démocratie n'est pas le désordre, la violence, le meurtre. La Démocratie ne saurait être confondue avec le Bolchévisme, cette sanglante caricature du socialisme, qui n'est que le triomphe des bas-instincts populaires, une explosion de haine et un déchaînement de la folie, une entreprise de brigandage dans ce que j'ai appelé autrefois les doubles

ténèbres de l'Orient et du Moyen-Age. La Démocratie, en vérité, c'est tout autre chose: c'est d'abord de l'ordre, de l'amour, du travail. C'est la victoire des vertus collectives et individuelles qui conditionnent le progrès, et non cette régression sauvage qui caractérise le bolchévisme où seuls les intellectuels déclassés, les aventuriers de bas-étage et les condamnés de droit commun ont trouvé profit et gloire.»

Pensée Bretonne, 15-02-1919

Gerioù-kroaz

	I	II	III	IV	V	VI	VII
1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							
8							

A-LED— 1- O-ber ur pennad hent gant. 2- Penn lavar — Kemmadur dre galeataz d'e heul. 3- Disonj dizibenn. 4- Eus broust. 5- A zo estren da. 6- Yezh kozh a-dreuz. 7- Mann. 8- Henroue — Neuz.

A-SERZH— 1- Maen da gizellañ. II- Stad

spred izel-mat. III- Douar brug ha raden. IV- Neuze n'eo ket heson ho mouezh. V- Eus transloutour. VI- Kousk a-dreuz — Araogenn lec'hiañ. VII- Evel an toaz a-wechoù - N'eo ket tomm.

Gerioù-diri

1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							

1. eus ar verb mont
2. kar gwenedat
3. revr kozh
4. togiñ e ruz pe e glas
5. e laez ar park
6. skoed
7. etre askorn ha kijenn



(diskoulmoù p.2)

FENT

Ur c'hroazour a ya d'ar groazadeg. Kent mont kuit e laka d'e wreg ur gouriz-surentez, hag e ro an alc'houez d'ur mignon mat dezhañ, —kenkas e varvje er brezel. Hag ar c'hroazour ha kemer penn an hent... N'en deus ket graet kant metr, avat, ma wel e vignon o t'ont etrezek ennañ d'an daoulamm-ruz, en ur huchal: «N'eo ket an alc'houez mat! N'eo ket an alc'houez mat!»

BERR HA BERR

STOURM AR BREZHONEG

Klemm a ra *Stourm ar Brezhoneg* a-enep ar fed ma'z eus bet goulnetaet un toullad eus e zilzi gant ar polis gall en Il ha Gwinin, e Penn ar Bed hag er Mor Bihan e-kerz ar sizhunvezhioù tremenet.

War zigarez ober un enklask a-zivout gour-drouzoù a-enep Rener Avezadurzh Departamant Il ha Gwinin e ra ar galloù gant emsaverien anavezet evl gant tud e gwall. Ha klask a ra lakaat an dud da grediñ ez eus torfedourien eus ar stourmerien evit ar brezhoneg?

War-lerc'h an harzadennoù hag ar goulnadennoù o doa heuliet manifestadeg Kemper e miz C'hwevrer 1988 ha war-lerc'h ar gevier embannet evit lakaat da soñjal eo ar kiriek *Stourm ar Brezhoneg* eus an tan-gwall e-ti-post Lamignon ne c'hell an taol-mañ nemet lakaat nec'hed an demokratek hag an dud a zifenn gwir ar Vretoned da ober gant o yezh.

Tud *Stourm ar Brezhoneg*, forzh penaos, ne vint ket lakaat da blegañ gant doar-er-giz-se. Ha kendere'hel a raimt d'en em gannañ evit hor yezh broadel!

Dister-kenañ eo plas ar brezhoneg er skinwel e Breizh: un eur hanter bep sizhun... pa vez skingnet degadoù a eurioù e galleg benediz!

Skignet e vez an abadennoù brezhonek d'an eurvezhoù fallañ zo, d'an eurvezhoù a vez diases d'an dam vrasañ eus an dud bezañ o sellout outo.

Travalc'h a zismegañs a vez graet ouz ar brezhoneg endeo evit ma vije gouzafivet ar c'hennem eurvezh a oa bet d'ar Sul 29 a viz Mae pa eo bet lakaet *Chadens ar Vro* da 7 eur beure evit lezel plas da abadennoù tennis Roland-Garros da greiatañ!

Stourm ar Brezhoneg a glemm start ouz ar c'hennem eurvezh-se hag a c'halv ar Vretoned da c'houiniñ an doujants diet d'o gwir da ober gant o yezh, ha da gaout ur chadenn skinwel e brezhoneg!

Stourm ar Brezhoneg, 21 straed al Leziou. Barn 56000 Gwened

RBLRBO

Evit ar wech kentañ abaoe krouidigezh RBLRBO e miz Eost 1982, en em vodo ar vodennguzulian a ra war-dro ar programoù er skingomz.

A-rak an emvod-se o deus klasket implijidi RBLRBO prederiañ diwar-benn yec'hed ar skingomz hag lec'h amzer da zont.

a) N'omp ket a-du tamm ebet gant roll programoù ar radio. Abalamour d'an niver a radioioù all o tont eus Paris a stourm ouz RBLRBO eo ar ret da homañ bezañ ur radio lec'hiet mat e Breizh, gwirizmet don er vro. E-lec'h ober an dra-se, pep roll programoù nevez gant ar radio-pellloc'h diouzh ar pal-se. A-wechoù, en ur seloù abadennoù zo, n'eus ket tu da c'houzout hag-eñ eo RBLRBO ur skingomz breizhek. "Laeret eo bet hon radio" a lavar deomp ur bem selouerien.

b) Krediñ a reomp ez eus nebeutoc'h-nebeutañ a selouerien gant ar politikerezh-se hag a-benn ar fin, e c'helle ar radio bezañ serret abalamour d'an digreke-se. Marv RBLRBO se vele un taol fall evit an demokratelezh er vro, war dachenn ar



sevenadur, an ekonomiezh koulz ha war dachenn ar vuhez sokial ha politikel.

Iv en deus divizez lazhañ spred breizhek ar skingomz?

Renerezh Radio-France e Paris a glask abaoe daou vloaz kreizmañ en-dro?

Renerezh RBLRBO e Kemper, kiriek d'an nebeutañ eus an taolioù fall a-enep personelezh ar radio.

70% eus implijidi a zo a-du gant ar soñjoù-se. E-touez an implijidi-se, ur bem diouto o deus kemeret perzh e krouidigezh ar radio.

Aon o deus, ma ne vez ket cheñchet penn d'an traoù, e lavarfe muioc'h-mui a selouerien «Deomp-ni eo ar RBO RBl».

BELIEN BREIZH KENVREURIEH SANT ERWAN (Kalc'hliher niverenn II)

D'an holl emsaverien e strollad hag emdroadur an Emsav abaoe miz Meurzh 1988.

1) Gant glac'har hon eus lidet deiz Lun Fask (4 a viz Ebrel) e Rospez obidoù hor breur beleg Gwilherm Dubourg, person Bulten-Kaouenneg, marvet di'hortoz deiz Yaou Gambit. Ezel feal e oa eus hor c'hevrenerezh. Unan eus hor bodadegoù kentañ hor boa dalc'het en e bresbital e Bulten, d'al Lun 16 a viz Du 1987. Seblantous a rac bezañ ya'c'h, ha laouen-tre e oa ouz hon degemer, prest da adgreiñ gant al labour emsavel poegwir e vele un esperant nevez o tiwan. Met taget e oa da val gant ur c'hlevved dimmed ha mervel a reat war an daol-oberata, tri devezh war-lerc'h emvod *Kristenien Breizh* e Plouneour Menz: m'en devoz kemeret perzh ennañ. Marvet deiz diazeadigezh ar vele-giezh gant hor Salver, ha douaret deiz emsavadeg an Iwerzhoniz e Dulem e 1916... Eus rummad ar velenen feal d'o feiz ha d'o bro e oa, war-lerc'h Yann-Vari Perrot, Pêr-Mari Lec'hvien, Marel Klerg ha Loëz ar Floc'h... hag ar re all... D'e

obidoù o da deroet ur c'han bennak a velenen ha kantadoù a fidedit. Fized e oa bet obidoù e strollad *Belien Breizh*. Graet e vo pep tra hervez e youl diwezhañ. Ha vo bremañ e pooc'h an aotrou Doue. Ni a gendalc'h gant ar stourm.

2) D'al 16 a viz Ebrel eo bet dalc'het e skolaj Kampotal e Rostrenn Guel. Kristen ar Vrezhenerien. Un taol-essa e oa. Daou-ugent kristen e oa deuet d'ar brezegenn displeget goude kreisteiz gant Yann Talbot diwar-benn dasorc'hidigezh Jezuz Krist. Goude ar stal-labour war ar c'han e vo kendid an ofereñ e chapel ar skolaj gant nav beleg. Emsaverien a oa deuet (ouzhpenn 50, ha tud eus ar ranvro ivez) a bep lec'h, ha dam anezho distad diouzh an Emsav abaoe ur pennad. Ar pezh a ziskouez e rankomp kendere'hel. Sklaer eo bremañ an traoù. *Ar brezhoneg a zo ho an Emsav broadel*.

Ar Feiz e Breizh ne c'hell azevel nemet dre an Emsav broadel mat e omp ken-tre-kentañ.

Un devezh all a vo azevel emz Gwengolo. Menegomp o deus 3 bugel brezhoneger, gant ur skolarez eus Diwan. Poent eo plidiñ da val gant kuden ar c'hatekizerezh e brezhoneg evit ar vu-gale.

3) Ar Marc'harid Gour-louen. Biatek-henn hon eus bet ouzhpenn 500 anadur enep emzalc'h frankikhibon person Douarnenez. An holl glemmademoù a zo bet kaset ivez da eskob Kemper. Eus ar broioù keltiek ez eus deuet kalz, 60 ouzhpenn, nevez eo, eus Kemev Veur, ha tregont eus Iwerzhon. Met chom a ra mut an liz oñsiel e Kemper, hag e Douarnenez. Evito'n eus ket ac'ha-nomp, ne gontomp ket evit ur gweneg, taoll.

D'ar Sul 5 a viz Mezhveur e vo lidet ur gouzout e Douarnenez en emor da Varc'harid Gour-louen. Person Douarnenez en deus nac'het e ve lidet un ofereñ evit en deiz-se en liz-parrez. Kinniget en doa d'al Lun, pe neuz mont da Kemper... III

Sklaer eo bremañ eo lakaet ar vrezhonegerien er-maez eus an liz oñsiel en eskopi Kemper. N'o deus ken an liz oñsiel en eskopi Kemper. N'o dilezel an liz oñsiel ha lakaat.

Seu perak e kinnigan kement-mañ d'ar gristenien a gar o yezh hag o bro:

— mar fell deoc'h kaout lidoù e brezhoneg (douaridigezh, badeziñ, eured), lakaat sklaer ho

youl war baperoù, ha goulnet diganimp, diouzh rei, o sevenn.

— ma ne fell ket deoc'h kaout obidoù e galleg, dacout d'ho polidrez, goulnet grotas war ho testamant un *interament* ivid. Ur beleg eus *Belien Breizh* a yelo da lavaret ar pedenezh war ho perzh vered, hag e lavare un ofereñ vrezhonek diwezhatoc'h e lec'h all.

4) D'ar Gwener 6 a viz Mae eo bet lidet obidoù ar Tad Medard Dourmap, Kabusin, en liz Gwengamp. Karout a reas e vro, e yezh, hag e vrenedur hervez Avit hor Salver. Kement e oa d'ar genvezerezh, met gant e glevied n'en devoz ket gallet kemer perzh er bodadegoù. Pedit a reomp evit reuz e ene.

Yann Talbot
Sekreter da e'horioz

SKOL DIWAN MONTROUZ

Digoret e vo ur skol Diwan e Montroulez a-benn miz Gwengolo a zeu. Ar re a blijfe dezho gouzout muioc'h diwar-benn an dra-se n'o deus ket lennoù a vo kaset o c'houlemañ. Tu zo da harpañ ivez gant ur prof diadeg pe ur wech dre vare. Ar gont zo Skol Diwan Montroulez, CCM Pleiber Krist, kod bank 15589, kod donkell 29741, Kont niv. 01086671140 alc'hevez RIB 77.

El Derez Diwan
Diwan O KLASER UN ANIMATOR

E miz Gwengolo a zeu e vo digoret ur skolaj gant Diwan. E Breiz e vo staliet ar skol — gant ar 6^{me} e vo kroget er bloaz-mañ.

Abalamour da se e miz Diwan o klask kelennerien evit ar bloavezh-skol a zo o tont (jezh ha skiantoù an den, sistematek, skiantoù naturel, soezjez).

Emañ ivez o klask un animator a vo e gwall-kelabourant gant ar skolañs kelennerien, e-ber war-dro ar vu-gale diazevad o miz vrezh keltiek.

Kelennerien eus an daervezhoù. Implijet e vo an animator-mañ war ar seadegoù diazevad hag ar gelennerien koulz e kevrennoù hag e-kever gop.

Kement-hini a ve dedennet gant ar post animatour-mañ a zo pedet da skrivañ da Sekretour Eil Eil Derez Diwan 8 straed Hec'h 35000 Roazon.

Ar goulemañ post a ranko bezañ emañ: a) ur c'hurricoulum vuze displeget warañ, anv, c'homlec'h, oad, studioù, h.a. diplomoù ha barreged war ar brezhoneg; skiant micher. b) ul liher evit displegañ perak en em ginnig.

Galvet e vo diwezhatoc'h ar re en em ginnig evit tremen dirak ar jun dibab.

Lilian Kergoat

Rener Pedagogel Eil Derez Diwan

DIWAN
O KLASER DANVEZ-SKOLAJEREN (SKOLAJEREZ)

Ret eo kaskit ar BAC + 2, antrezeged vrezhonek. Kas ur C.V. da zDiwan BP22 29214 Lan-ailiz p.lig. 98.04.05.42.

TRO-DRO

EMSAV

D'AN

Lavaret e vez alïes ez eus oristaled, da zereatañ, eus tud an Emsav. Gwir a-walc'h eo evit lod Lavaret e vez alïes ez eus oristaled, da zereatañ, eus tud an Emsav. Gwir a-walc'h evit lod anezho met ken gwir all evit an istrogelled a vez o treiñ hag o tistreïñ en-dro dezho.

An embismigerien a rafen a-walc'h eus ar re a laka dizehan e penn-kont diazezoù an Emsav hag o ferzhiadur ennañ. Dic'houest int d'ober o soñj, na war an eil tu, na war egile. Teoriennoù brav a zeu ganto war an doare a vefe da saveteiñ ar yezh, hag ar vro 'ta, o flijadur a vez sevel ha diskar, prouiñ ha enep-prouiñ, en unangomzoù tro ha tro entanet pe zic'hoanag... ken ne chom nemet blaz ar c'hweri war o lerc'h. A-wechoù Gall, a-wechoù Breizhat, a-wechoù gwenn, a-wechoù

ruz, balafenniñ a reont dibaouez. Tud ar fistilh hag an digredenn int, ganto e chomfe an ilizoù-meur da sevel c'hoazh.

An dermerien eo ar re Breizhat a galon ha ne'z aint morse pelloc'h. Touet, mildouet o deus deskiñ ar yezh hag ober ganti, touet o deus kemer perzh, stourm, kensevel ha padal e tro rod an amzer hag int en o roudenn, en o rouzmouzerzh pemdeziek... Tuet int, douget e vefent met na pegen aesoc'h eo azezañ war wrimenn an dachenn da sellet ouzh pegadeg ar c'hoari-erien en ur stlakai o daouarn bep an amzer memestra.

Ar re ziwezhañ eo paotred an emc'hloar. Ganto emañ ar

barn divrall. Komz a reont a sevenadur, a sevenadurezh, a lennegezh dre gomz, dre skrid, kement-se holl e galleg peurvuiañ. Pouezañ-dibouezañ a reont chañsoù hag esperañs buhez hor paour-kaezh yezh deomp-ni. Ober fae a reont war brezhoneg he-mañ-hen, tabutal didermen e galleg war levezon ar galleg war bouezmouezhiadur hag ereadurezh ar brezhoneg... Teurvezout a reont memestra lenn ha burutellañ oberoù ar vrezhonegerien yaouank... dont a ra ganto prezennoù war baourentez a-vremañ hon lennegezh ha war c'houestoni brezhonegerien hon amzer da deurel frouezh lennegel azv c'hoazh en dazont. O oberoù-int, pelec'h emaint, o ferzhiadur en arz hag en istor, danvezioù ken tomm d'o freder? Ober fae a reont eus an Emsav ha bevañ diwarnañ.

Me eo gwelloc'h ganin c'hoazh oristaled an Emsav gred bezañ hag ober.

Padrig an HABASK

PSI KOZH-NOE

